



TONKAD

64

**VEFA DE BELLAING ALAN HEUSSAFF
OLIER MORDREL ABANNA ERWAN GWEGEN
YOUENN OLIER YOUENN GWERNIG
GOULVEN PENNAOD BRENDAN J.L.**

PREDER

Kaier 58
Ebrel 1964

TONKAD 64

Abaoe pevar bloaz e c'houlenn PREDER digant un nebeut skrivagnerion sevel ur skrid war un danvez kinniget : ar yezh, ar politikerezh, dazoned an Emsav.

Divizet ez eus bet, hevlene, lakaat an emsaverion da gomz eus o buhez dezho, o buhez pemdeziek.

"Un devezh eus ho puhez" : nav o deus kaset ur skrid.

Kregiñ a ra an niverenn gant VEFA DE BELLAING a gont deomp penaos e tizoloas an Emsav. ALAN HEUSSAFF a zanevell un devezh en Iwerzhon (hag un nozvezh e Breizh). OLIER MORDREL a hañval bezañ e vuhez rannet etre e vicher hag ar yezhoniezh : Cordoba ha Breizh. ABANNA a lak e viz war an torr a zo e buhez ar breizhad. ERWAN GWEGEN "an hini kozh", a sell ouzh e vuhez a-vremañ hag ouzh hini gwezhall. YOUENN OLIER a gas da DONKAD un nebeut pajennoù tennet eus e zeizlevr : buhez un emsaver e-pad ar brezel diwezhañ. YOUENN GWERNIG, harluet e New-York, a daolenn evidomp ar Stadoù Unanet hag e vuhez du-hont. Gwelloc'h e vije bet, marteze, kregiñ gant pennad GOULVEN PENNAOD dre ma klask ster don gerioù an danvez kinniget : "Petra eo se, un Emsaver ?" Echuiñ a ra an niverenn gant pennad BRENDAN J.L., yaouankañ kenskriver TONKAD 64, a gomz eus e vuhez aloubet (evel e levraoueg !) gant ar brederouriezh.

Loeiz LEMOINE

VEFA DE BELLAING

D E C ' H H A W A R C ' H O A Z H

En nevez-amzer e oa. Kêr Gemper a oa tommik-brav dindan an heol klouar.

Edon an deiz-se o tistreiñ eus ar skol - 15 bloaz bennak e oan - ha prest da vont ouzh taol da verennañ gant va zud.

Setu ma voe digoret dor an ti, ha va zad o tont tre, ur gelaouenn en e zorn, o tiskouez anezhi deomp, hag o lavarout, liv al levenez war e zremm :

"Setu erfin ar seurt kelaouenn a glasken ! Emaon o vont da goumanantiñ diouzhtu !"

Breiz Atao e oa, ar wech kentañ d'am zad d'he lenn.

Ma'm eus dalc'het ur soñj ken resis eus an darvoud-se, ez eo, dre ma'z eo bet heñchet va holl vuhez war-du ar vroad-elouriezh diwar an deiz-se.

Va zad a oa ur broadelour a-viskoazh, met n'en doa ket kavet betek-hen ar gelaouenn a glote gant e venozioù. Koumanantet e oa da veur a hini. Pa anavezaz Breiz Atao e tigoumanantas diouzh kelaouennoù "rannvroelour" evit reiñ e holl skoazell d'an Emsav nevez e oa o paouez dizoleiñ a drugarez da vignoned yaou-ankoc'h egetañ, darn anezho bev c'hoazh bremañ.

Klasket en doa deskiñ brezhoneg, met ma oa gouest da zistagañ frazennoù berr diwar-benn traoù ar maez hag ar chase, evel : "Brav eo an eost ar bloaz-mañ", pe "Klujiri 'zo er park ?" dirak kouerion hor c'horn-bro, ne vije ket bet gouest da lenn unan eus an testennoù a oa o tiwan muioc'h-mui diwar bluenn skrivagnerion yaouank Gwalarn; hag eñ koulskoude gouiziek kenañ war ur bern tachennoù, peurgetket an istor hag ar ragistor. Marteze ne oa ket donezonet evit ar yezhoù, hag ouzhpenn-se, d'ar mare-se ne oa ket kentelioù brezhoneg a bep seurt evel ma'z eus bremañ. "La Langue bretonne en 40 leçons" a oa en e levracoueg, ha lennet gantañ meur a wech, met rouez-tre eo, me gred, an dud a zo deuet a-benn da gomz brezhoneg dre al levr-se.

Forzh penaos, un den kar-e-vro hag un arzour e oa va zad. Karout a rae Breizh gant he finvidigezhioù, he sevenadur hag hec'h istor a anavezse eus ar gwellañ. Madelezhus evit an holl - dreist-holl evit ar re baour, ar re wasket, en doa klasket reiñ d'e vugale karantez evit ar re vac'het, ha da gantañ-holl karantez evit Breizh.

Maget e oa bet va spered gant dezrevelloù Walter Scott da skouer, e-lec'h ne veze kaoz nemet eus Skosiz heskinet en abeg d'o c'harantez evit o bro, eus "Kroc'hened Ruz" target gant ar re wenn, eus tud harluet ret dezho kuzhat er menezioù, h.a. Romantel-kenañ e seblant din bezañ bremañ an istorioù-se, met d'ur grennardez petra gwelloc'h eget darvoudoù kevrinus evit entañ ur galon ha stummañ ur spered ? Evel ma skriv M. Mordiern e "Talar an Hoc'h" levezon al levrioù bet lennet ez-yaouank a zo bras. Dreist-holl pa glet gant an endro tiegezhel. (Lavaret ez eus bet din e vezen bepred a-du gant an tigr, a-enep d'an doñvaer. Marteze a-walc'h, ha morse n'em bo keuz da se.)

Prest e oa an dachenn evit resev an had, ha pa varvas va zad e 1927, un nebeut deizioù goude ma kemeras perzh e Kendalc'h Breiz Atao e Rosporden, e oan stag mat ha da viken ouzh an Emsav.

Er c'hendalc'h-se e oa deuet, ouzhpenn ar Vretoned, di-leuridi eus Iwerzhon (O. Mac Uillis ha daou zen all), eus Kembre Dyfnallt Owen hag e verc'h Meirion chomet mignonez deomp abaoe, eus Bro-Flandrez, eus Bro-Elsaz. Pa adsellan ouzh al luc'h-skeudennoù tennet an deiz-se a Wengolo, e soñjan er re aet da anaon en un doare mantrus pe skrijus dre m'o doa aberzet o

buezh d'o bro ; Debauvais, Bricler ha kement a re all, evit Breizh, C. Dahlet ha Paul Schall, Elscziz fuzuilhet gant Bro-C'hall e-tro 1930 (?). War un dro gant ar skeudennoù-se, m eus miret ur c'harnedig bet pignet ganin war ar prim evit dastum sinadurioù ar gendalc'hidi a oa holl tud-veur, evidon-me plac'h yaouank eeun hag hegreidik.

An deiz-se ivez e ris anaoudegezh gant R. Hemon en un doare fentus a-walc'h. Edon e fofis ar sal o selaou ur brezegenn graet gant un alvekad eus Kemper, ezel oberiant eus Breiz Atao, aet da anaon bremañ pell 'zo. Em c'hichen e oa azezet un den yaouank dianav din, sioul-kenañ, ha na seblante ket bezañ ken tomm ha ma oan-me ouzh komzoù ar prezegenner. Pa voe echu an displegadur, an holl selaouerion a stlakas o daouarn, nemet va amezeg. Ha me, feuket un tamm, o treiñ davetañ, hag o lav-arout dichek dezhañ : "Penaos 'ta ? N'oc'h ket a-du ? Ne gompr-enit ket pegeñ talvoudus eo hor stourm ?"

Arabab fiziout en dour a gousk ! Roparz Hemon an hini e oa ! Un survezh goude e ouezis e oa-ef ar yezhour a anavezen e anv a bell 'zo. Goulemm a ris outañ levrioù evit deskiñ brezhoneg, o c'has a reas din ha kregiñ a ris neuze gant va studioù.

Met, na diaes e kaven labourat va-unan !

Pa vezen o vont d'ar skol e tremenen bemdeiz dre diabarzh an iliz-veur - berroc'h e oa an hent dre eno - ha d'an sur-se e pleustre an ao. Chaloni Mayet war an ograoù. Kavout a ran plijus-kenañ klevout sonerezh kaer arroc kregiñ gant kentelioù arabadus ar skol.... Gwelout a ran en ur dremen an daolenn a ziskouez an Tad haner o resev donezon ar brezhoneg digant un ael. Pedit a ran an Aotrou Doue hag E aelez d'ober an hevedep burzhud evidon-me. Pedet am boa gant trawalc'h a feiz, moarvat, peogwir eo deuet davedon, neket ur gwir ael, met Marc'harid Gourlaouen. Ken talvoudus all eo bet din !

An Emsav am eus anavezet em yaouankiz a oa taeroc'h - hag e oa ! - eget an hini a-vremañ. Feulz e oa, trouzus ha kilvers. Ma'z eo bet rebechet alies an doareoù-se, ne c'heller ket nac'h na vije bremañ nag emsav lennegel nag emsav dambol-itikel, na MOB zoken. Pa soñjer e oa ret bezañ kalonek evit dougen an hevoud arouez an Unvaniez Yaouankiz Vreiz, pe diskouez Breiz Atao er straed, e weler an hent graet abaoe ar mare se, a drugarez d'an dud "trouzus"-se, ha n'o doa ket aon da ziskouez o menecioù, zoken pa veze respontet dezho gant taolioù mein !

Un deiz m'en em gaven gant Debauvais dre straedoù bann-lev Roazhon, setu ma welljomp paoctred yaouank oc'h ober goap en ur lenn ur skritell peget dre guzh e-pad an noz gant paoctred Breiz Atao, hag o Klask drailhañ anezhi. Ha Debauvais deut ar fulor ennañ, o vont da grial d'ar re yaouank-se : "Ne gomprenit ket eta emaoamp o labourat evidoc'h, evit ho tazoned war zouar Breizh ?" Klask a rae diwall ar skritell diouto hag en em zifenn kalonek diouzh an dormadoù roet dezhañ. Krenañ a rae gant an nerzh-youl.

Pa veze toullbac'het ur stourmer, se a rae muioc'h a vruderezh evit an Emsav eget dek pajenn en ur gelaouenn. Trouz a-du hag a-enep - a-enep dreist-holl, ret eo hen anzav. Met anv e veze eus Breiz Atao ha se a zegase ar gaoc'z war an Emsav. An dud a dabute, hag evel ma vez lavaret e galleg "de la discussion jaillit la lumière" pe ...an tan. Ar gouloù a skedae evit un nebeut tud, met ar brezel 1939 a lazhas an tan-se evit enaouiñ unan all gwashoc'h.

Pezh a veze frouezhus er bloavezhioù kent ar brezel ne vefe ket marteze hiziv an deiz. Da bep amzer he doareoù.

Met pezh en deus graet diouer dre vras d'an Emsav-se a zo bet implij ar brezhoneg.

D'ar mare ma oa brezhoneg dreist-holl gant gwerin Breizh-Izel, e veze graet ar stourm e galleg. Ne c'heller ket rebechiñ an dra-se d'ar renerion koulskoude, rak meur a abeg a oa d'ar mank-se :

- Lod anezho ne ouient ket brezhoneg, Breizh-Uheliz e oant. Ma oa R. Hemon o kregiñ gant Gwalarn - erv divent ha talvoudus-dreist a zigoras da vat an endro vroadel gwirion e Breizh -, Debauvais ha Mordrel desket brezhoneg ganto, oc'h implijout ar yezh, an hini kentañ dalc'hmat, an daou all her dre m'hallent, kalz eus ar stourmerien all ne oant ket gouest da gomz brezhoneg, ha dre-se e veze kaset an traoù en-dro e galleg.

- Ar werin a vije bet gouest da gompren bruderezh dre gomz, met ket dre lenn.

- Marteze ivez ne wela ket renerien 'zo eus an Emsav levezon vras ar yezh war spered an den. Darvoudoù Iwerzhon ne oant ket pell c'hoazh, ha troet e veze sell ar Vretoned ouzh ar vro a oa o stourm, e saozneg, evit he frankiz. Tizhet he deus Iwerzhon he dieubdigezh douarel ha politikel. Met ne gav ket din he dije distaollet da vat krog Bro-Saoz diwarni. Gant ar saozneg eo chomet ar c'hrog-se sanket-don enni.

E-mesk ar re deuet d'hon Emsav er mare-se, ne oa nemet unan dre ugent o teskiñ brezhoneg, ha c'hoazh !, gant ar soñj e oa un dever dezhañ hag e adkavie dre an tu-se ar gwrieniennou en doa ezhomm anezho.

Bez' e c'heller lavarout n'eo chomet en Emsav, n'eo bet talvoudus dezhañ, nemet ar re o doa kemeret ar boan da zeskiñ yezh ar vro. Setu perak e tleer kaout fiziañs en amzer-da-zont Breizh, pa weler ar c'hantadoù a dud yaouank o teskiñ brezhoneg. O stummidigezh a vo donoc'h. Pep hini ac'hanomp desket brezhoneg gantañ a oar penaos e weler an traoù en un doare dishevel adal ma vezer gouest da lenn "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh" da skouer, en destenn-orin.

Ar re na oant dedennet nemet gant ar politikerezh, zoken ar re daerañ, n'int ket chomet holl en Emsav, pell ac'hano. Nag a dud prest da lakaat da darzhañ holl savadurioù Bro-C'hall, hon eus anavezet, hag a zo bremañ pell diouzhomp, mezh ganto zoken pa vez degaset koun dirazo eus an amzer-se !

An dud-se o dije kenkoulz stourmet evit ur menoz all, hini an "Action Française" pe "An Humanité". C'hoant o doa da implijout nerzh o yaouankiz ha setu holl. Ne oant ket gwir vroadelourien vreizhat. Ne gav ket din e vije bet unan eus ar seurt tud-se en dije desket brezhoneg. N'o doa ket komprenet gwir ster hor stourm. Evito, Breizh a oa kentoc'h un digarez eget ur pal. Evit kompren ez-don hor pal, hag e dizhout, e tleomp implijout hor yezh.

Stourm war an dachenn arboellerezhel hepken a zo ur fazi. Rak, ma ne glask ar micherour pe an arzour, nemet gounit e vara, perak ne'z afe ket da glask ur vuhez larkoc'h e Marsilha pe Strassburg ma kav tu d'hen ober ? Ne chomo e Breizh nemet ma wel un diforc'h etre e vro c'henedik ha Bro-C'hall, m'en em sant Breizhat. Hag ar brezhoneg a zo arvez anatañ an diforc'h-se.

o o o

Un devezh all ha na vije ket bet anezhañ ma ne vije ket bet hini Kemper gwehall, en deus bet ul levezon vras warmon, ha diwar houmañ war veur a hini all : an deiz ma'z is evit ar wech kentañ d'ur c'hamp brezhonegerien.

Aliet e oa bet din gant Skol Ober, mont di evit en em ober diouzh ar brezhoneg komzet, rak e Breizh-Uhel e oan ha n'em bea ket tro da implijout pezh e oan o teskiñ.

Mont a ris eta en hañv 1937 da vilin Bennfoull stok da Blougastell, e-lec'h ma oa bet aczet gant Kervella-Kongar, J. Breton, H. Maze, h.a., un doare kamp a zegemere broad-elourien, c'hoant dezho brezhonegañ etrezo. Resevet e veze ivez nannvrezhonegerien, rak ur greizenn a vroadelouriezh e oa da gentañ.

Eno e voe ret din, da gentañ kompren ar yezh, goude-se klask he c'homz. Div strivadenn re start evidon. Deuet e can evit ur sizhunvezh. A-benn tri devezh ez is kuit, spontet, fuloret ha poan-benn bras din, o touiñ ne'd afen morse en-dro !

N'on ket deuet en-dro da vilin Bennfoull, nam. Met gwashoc'h am eus graet : sevel Kamp ar Vrezhonegerien gant Langleiz ha Ronan Huon, e 1948, kerkent ha ma voe tu da vodañ tud war-lerc'h ar brezel. Rak meizet em boa talvoud-egedh vras ar bodadegoù a seurt-se.

Ne gontan an istor personel-se, nemet evit lavarout d'ar re a zo o teskiñ : "Arabat digalonekaat ma kavit re denn deroù ho studioù. Kendalc'hit pennek, digoll ho pezo, hag eñ brasoc'h ha kaeroc'h eget na c'hellit krediñ !"

Klevet em eus tud o tiskleriañ penaos, abaoe m'o doa dizoloet an Emsav e oa bet kemmet o buhez penn-da-benn, roet ur ster nevez dezhi.

Avi am eus bet outo, rak un dizoloadenn vurzhdus, ul levenez hep par e tle bezañ. Evidon-me, kavet am eus an em-lec'hiadur-se em c'havell koulz lavaret. Dre-se, daoust ha n'eo ket-hen gwakoc'h, gwanc'h, evel ma'z eo gwanoc'h kred-ennoù un den bet desavet e relijion e dud, eget re unan kavet ar feiz gantañ e-uman ?

Diwezhatoc'h, a-benn bloavezhioù, e vo gwelet hag eñ e teuo da wir an huffreoù kaer a sav hiziv e kalonoù an emsaverien. Salv ma vo sevenet en o fezh uhelvennadoù an tadoù hag ar mammoù a-vremañ ! Diwar c'houzañv e teu karantez pe gasoni...

o o o

Tud 'zo a c'houlenn : "Perak klask saveteiñ Breizh ? Daoust hag ez eo-hi dellezek a vezañ salvet ?"

Ma wellfec'h ho mamm o vont da veuziñ, ne chomfec'h ket war ribl ar mor oc'h en em c'houlenn : "Daoust hag e

talv ar boan he saveteiñ ? Peseurt perzhioù mat a zo enni, a dalvez ez afen-me en arvar eviti ?"

Nann, neketa ? Eus ho kwellañ rafec'h raktal evit he derc'hel e buhez.

Evel-se eo evit Breizh. Dav eo mont war-rack, hep sellout re a-zehou hag a-gleiz.

"Neb a ohom da sellout ouzh pep koabrenn
Ne gemero biken penn e hent".

Goude-holl, daoust ha ne vo ket evit pep hini ac'hanomp, warc'hoazh hon devezh pouezusañ en Emsav ?

1.1.1965

o o c

Pa'z eo bet goulennet ouzhi gant Abanna "danevelliñ un devezh eus va buhez", komprenet fall am eus. Kavout a rae din e oa bet goulennet dezrevell devezh pouezusañ va buhez a-keñver an Emsav. Ne oa ket se, tamm ebet. Korbulet e vijen bet an emodenn !

Met peogwir ez eo Abanna chivous a-walc'h evit diskleriañ da lennerien PREDER petra a ra a-hed o devezh an dud managet o anv war golo an niverenn-mañ, setu petra am eus graet hiziv. Hiziv, un devezh heñvel ouzh an devezhioù all, na mui na maas.

Da bet eur on savet ? Da seizh eur.

Petra am eus graet er beure ? Stensilañ ha stensilañ diehan. N'eo ket da renerien PREDER, SKDL, h.a., e c'heller lavarout : "Amzer 'zo !"

Petra am eus graet goude marenn ? Etre 1 eur ha 2 eur : respont d'al lizheroù resevet da 11 eur, skrivañ lizheroù all (pourgetket e sell da gavout ul lec'h evit Kamp an hañv-mañ. Nag a lizheroù kaset en aner endeo !)

Da 2 eur, kuitet an ti evit labourat war va micher levraouegerez : hiziv, mont da breñañ levrioù e kêr, dibab romantoù, studiadennoù, levrioù istor, h.a. Plijus-kenañ ar gefridi-se. Preñañ a ran danevell Tabarly diwar-benn treizhadenn atlantel ar "Penn-duig", ar priz Médicis (pebezh lennegedh !), romantoù diwezhañ skrivagnerien estren ha gall, ur studiadennoù diwar-benn Samuel Beckett am eus c'hoant e vefe-eñ muic'h anavezet gant lennerien hol levraouegoù. Mac'het preñañ romant Jean Cau a chome da louediñ war un astall.... Arabat ankoun-ac'haat preñañ ar romantoù-polis ken prizet gant hor c'houmananterien a gav enno moarvat, ur seurt divoustradur.

Pa da vare e vo tu d'ober an havalap dibab a-touez oberunnoù e brezhoneg ? Goude konna, da 8 eur, stensilañ adarre diehan ha didruet betek hanternoz. Ne chomin ket palloc'h fenozh, rak un emgav am eus bremañ. Un emgav gant S. Beckett a zo o c'hortoz ac'hanon. Muic'h a c'hañs am eus eget Vladimir hag Estragon, rak

ma'z emaint c'hoazh o c'hedal Godot, Samuel Beckett a zo deut betek annon gant e ved truezek. Lenn a ran ar studiadann prenet en abardaezh. Dipitet bras on. Skrivet eo bet gant unan ha n'anavez tamm ar spæred kelt. Aet oc'h e-biou, c'hwi ivez, aotrou ! Spæred Beckett a zo kalz æunoc'h eget ma kredit !

Poent eo kousket. Ne gredan ket sellout ouzh an eurier. Petra !vern !

Trugarekaomp an Aotrou Doue en deus ijinet an noz evit permetañ deomp implijout an eurvezhioù-se da labourat ouzhpenn en eurvezhioù-deiz.

Sofijit 'ta ! M'En dije, en E furnez pe E faltazi, lakaet an amzer da chom a-sav pa'z eo noz, ne vije ket bet a Emsav. Pa'z eo gwir e vez ret deomp, emsaverien, bavañ daou zavezhiad eus un heol d'egile.

5.2.65

o o o o o

ALAN HEUSSAFF

P E T R A Z O ! N E V E Z E B R E I Z H ?

Goulou-deiz. Un hent didud tre sko ouzh mogerioù ur gêr gloz. Pignat a ran war ur savenn. Ac'halemañ e welan mat ar maerzioù war-du ar c'hreistez. Ne dan ket e kêr, da ziwall am eus ouzh flatrerien.

Predeier lufr ha blot, klazioù du ha naazioù ræsklek. Palloc'h ez eus gwaz frouezh e bleuñv. Setu pennkêr Lokmaria, mercurioù Brezero'han, Trevidiern ha Koad Kulodenn. En ur stankenn avalennek e-kichen emañ millin ma c'henderz Youenn. Un den tavedek, dudistoc'h gant e wanan eget gant an dud. Digantañ om bo disaouzan eus ar pezh a zo tremenet ar c'horn-bro abaoe ma'z on aet kuit.

Penn ar cheoser e Pont-al-Lenn. E traoñ ar ribin a gas d'ar porzh e par marc'hed ha bugale o selloù ouzhin. Diagi am eus da gomz outo rak ma e oar e kavint iskis ma brezhoneg rik ha rannyezheul kemmesket. N'on ket mui boaziet da "safarifi" evalto.

Ur mell gwaz a zadosta. Ewisket eo e du, un erien ler lufr zo d'e gask-ctenn. Un archer, ma n'oun darev ? Ra zeuio. Goude bloavezhioù a eneberezh aner - war baper - e kavin hat adarre er c'hrogad... Padal, Youenn an hini eo ! Didro e salud, evel pa'm bije kajet gantañ n'eus ket ur miz. Ur c'hwengl hag ur morzhel zo gantañ. A daollobigoù buan e stag da skeif ouzh lagadenn ar benveg evit e zidroadañ...

.....

alan heussaff

An dihunerezh he deus sonet. Eizh eur nemet kard eo en Iwerzhon. Savit, bugale, gwiskit ho tilhad, na zaleit ket !

Emeur o vountañ ouzh dor an trepas, paper a sarac'h hag a bok war al leur tra ma tarc'hav teodenn skerr-al-lizherioù en-dro dre nerzh he gwinterell. Mall am eus da welout petra zo daout gant ar post, daoust ma n'eus marteze nemet ur c'hozh paperenn-vevrezh pe ur gelaouenn didalvez bennak hag a daolin diouzhtu d'ar blooù. N'on ket evit herzel evel ma c'heneil M. : hennezh a oar gortoz div pe deir sizhun evit digeriñ e lizherioù. N'eus ket a zifrae, emezaf. Fae a ra war baperacherezh emsav Breizh.

O tiskenn gant an diñ e z a ma sell war-du an noz. D'ar mare-mañ bemdez e verzan un hirezhezh dispis evel pa vefan o c'hedal ur gannadiezhe pouezus, a gelaoufe kemm sterleun er vro, pe a verkfe ez eo kadarnaet ar vrogerourion. Un arouez a ziouer eo ar sell-se. Ha koulskoude n'em eus ket mall da zistreiñ d'ar vro. Boaziet on ouzh an dispart. Ma darempredoù gant ma zud-nes zo distaroc'h-dister dre ma tremen ar bloavezhioù. Pep hini ac'hanomp a vev gant prederioù dishefvel tra ma'z eo kemmet kalz starn hon afovennoù boutin abaoe keit all. Gant ar re a striv hag a boagn da savañ ar mennad broadel eo am eus ezhomm da gaout darempred.

o o o o o

Petra en deus degaset paotr al lizherioù hiziv ? Ur c'holoenn rouz a zo gant un timbr saoz hag unan louet gant un timbr alaman. Ha La Vie Bretonne gant he bandenn wenn.

Bugale, na chomit ket da lenn pe e viot diwezhat er skol. Na chomit ket da randoniñ ha da sbatif. Debrit ha netra ken. Da nav eur e rankot bout prest, gwalc'het ho pegoù ha gwisket ho mantilli !

Eus Béal feirte e skriv cener ur gelaouenn iwerzhonek da c'houlenn ouzhin kavout dezhañ daou pe dri c'houmananter. Ezel eo eus ar c'hevread Kelt. Ma kavan pevar den da goumanantif a-gevret, a zoy un distaol e 40%. Dav vo din skoazellañ. Anaout a ran un nebaut tud en adrevez amañ hag a rin dezho ar c'hinnig. Ni a bren ar gelaouenn peurliesañ. Ha ma ne fell da zen all, deomp e vo koulz koumanantif.

An eil lizher a zo digant un den hag a labour en ur burev-kelaouif e Frankfurt. Dre zegouezh en doa kavet ur skouerenn eus Breton News hag a oa bet kaset d'ar burev-se. Ma fedet en doa d'e lakaat war roll-chomlec'hioù hor c'hannadig, dezhañ e-unan da gaout keleier eus hor bro. Ha ma da c'houlenn outañ penaos e oa dadonet gant hor c'hudenn ha daoust hag a rofe sklaeridigezh din e-zivout an degemer a vez roet gant ar c'helaouennoù alaman da B.N.

Ul lizher hir eo. "A-du on", emezaf, "gant ur c'hevread europat ma vo roet he frankiz da bep pobl, bras ha bihan. Kement-mañ a vo ret evit ma vo stabil ar c'hevread. Pa lam ur vroad vras he merkoù-diforc'h digant unan vihan

e ra enebourion hag a vez darev da gevredif gant n'eus forzh piv evit adc'honit o rezid. Abagoù personel am eus avat evit kemez parzh en ho stourm. Ma zad-kozh hag a oa ofiser a labouras gant Rusiri Casement e 1916. Ma a sell ouzhin ma-unan evel ur C'helt. Ur mezeg eo a lavaras din e 1942, un tamm diwar fae, e oa din nauz-korf ur C'helt. Skeiñ a reas ur c'helaouenn ganin, met broudet on bet goude-se da glask gouzout pesaurt tud e oa ar Kelted-se".

Sell 'ta, n'eo ket ar wech kentaf din da gavout tud eus mervant an Alamagn hag a sent ez int Kelted. Graf Stauffenberg, un sentz d'ar c'horalon brudet, a lavare kement-se diwar e bouez-ef. Souabad e oa, evel ar c'helaouer-mañ. Kemendall an deus skrivet din ur studior eus Chicago hag an deus un tad-kozh genidik eus ar Spessart. Ha kennad Bro-Suis en Iwerzhon a ra ur C'helt anezhañ e-unan ivez. Ne vefe ket ur stultann eta, met un aspadenn en hiniennoù-se eus ur skiant a ouenn goude Hozozik 2000 bloaz ?

Arabat, e kendalc'h ma c'helaouer, gortoz ac'h embannfed keleier eus stourm Breizh du-hont bremañ. E genvroiz zo laouen pa'n em glevont a-benn ar fin gant ar c'hallaoued, hag ar zenerien-gelaouennoù a ra diouz ar sentadeg-se. Forzh penaos, en darn vrasañ eus an dud n'int chalet nemet gant dastum ha dispign arc'hant. Breizh, emezo, zo ur vro vras, hogen ar Vrezhonek, daoust ha n'int ket warlerc'hiet ? Ha n'o doa ket harzet ouzh an Dispac'h Bras ? Doujañs a dleer kaout dirak Nagaiz, Kurded, marianed hag a stourm evit o frankiz. E Klaskfe avat Euskadiz, Katalaned ha Brezhoned en em ran... se 'zo iskis ! kil-stourmus ! - Setu ar pezh a lavarfe kalz eus e genvroiz.

Emic'hafis n'on ket feuket na digalonakaet. E badeu em boe d'am gouzaouiñ. Eñ zo a-du geneomp.

Eveljust, stourm ar Garded, Nagaiz ha pobloù "gouez" all zo estlammus. Stourm a reont. Emsavioù Kornog Europa avat, ha pa riskfe o izili o buhez evel a Tirol hag Euskadi ibarlat, ez eo diaesoc'h dezho enacouiñ estreget truzez en estrenvro. Ni zo doavaet, sivilizet na petra 'ta !

Kaset em eus ma skolidi betek o zi-skol e kreiz kêr, roet dezho ur skilling evit distreiñ gant ar c'harr-boutin en endervezh-mañ, ha deut on betek ar burev ma vez liesskrivet Breton News. Dec'h da noz em eus echuet prientif niverenn an Diskar-Amzer hag e fell din bremañ reiñ an destenn da stensilañ. Arack mont tre e choman em c'harr da deural ur primestall war bajennoù La Vie Bretonne. Abaoe tri miz ne oa deut niverenn ebet. Moarvat m'em defe amzer e kavfen danvez ionnusoc'h da bannaouiñ enni eget darn eus ar c'helaier am eus dastumet. Moan eo ma "feskerazh" ar wec-mañ. En dianost ar bloavezhioù tremenet em boe bet dalc'hmat darvoudoù da zezrevellañ : trouz a oa gant ar gouerien, bardelloù a veze war an hentoù ha pester-pailgomz er famioù. Bec'h d'an taillaj ! An hefiv-mañ tremenet zo bet peoc'hus. Pax Romana ar Stad C'hall a gendaic'h da vougañ Breizh.

Petra 'lavar Martray an e bened blein ? Kenlabourat, plagañ gant ar spi da zont war c'horre ur wech bennak. Hag awenet e vefe ar CELIB gant sturiennoù

ar jiu-jitsu, gant ar menoz e vo gouest dre weañ hag itrikañ da drec'hiñ e gevezer ? Gwir eo, pa vezer gwan e raker bout gweñ ha gwidilus zoken. Met amañ e c'houren an hini gwan gant ur vrec'h : eben zo "leal", erest eo. Hag evit ar c'houlz emañ CELIB dindan. N'aus ket difrae d'han kemenn.

An arc'hantroll gall : netra nevez. N'eo ket garv a-walc'h evit lakaat an dud da skrijal. - Ur burev-kenwerzh breizhat e London : setu un taol-intrudu heverk, war wrimenn ar Stad. E vunenget em eus. Muioc'h a lakain ur wech all, ma ne vo ket bet didalvoudskaet gant an harzoù a sav Bro-Saoz a-enep enporzh-iadurioù. Ijinerezh ar "C'hoznog" : emañ ar Westoned o krignat La Vie Bretonne ivez.

Met n'em eus ket amzer da groueriat ar pennadoù hir-se. Sell, AL LIAMM zo meneget. Gruderezh zoken. Hag ur pennad ... brezoneg a zo, evit ar wech kentaf (?), gant un droidigazh evit ar veuzed evelato. Da vihanaf emañ al lizherennoù bras en tu ma 'z eo diaet.

Ret din adlenn ma zestann Breton News, n'em eus ket bet tro d'hen ober dec'h. Ar saozneg zo da wallaat amañ hag ahont. Ar pennadoù zo bet teskaouet e pep seurt kelaouennoù brezhonek ha galleg (bout 'zo bet un amzer... ma veze dik kenskriverien da gas keleier diambann); hoverz eo levezon an div yezh-se em c'hentañ ha zoken em eil danze. Evit ober mat e tlefen adskrievañ ar pep brasañ goude bezañ chomet ul lajad hep lenn na komz estreget saozneg.

Merkañ a ran an urzh ma tle ar pennadoù bout lakaet war ar stensiloù. Ar wech-mañ, re vo lakaet da gentañ ar c'haleier diwar-benn ar skolioù-hañv brezhonek. Ar re a-zivout harz-labour al laezh n'int ket talvoudus drezo o-unan, met a-gevret ganto em eus displeget penaos e teu ar strolladoù-micher da zamantif un tammig da gudennoù arboellerezhel Breizh. Ma vefe tu d'o c'hadarnaat er stumm-spered-se e vefe graet ur c'hammed bras war-du an adsav. Araok ma tihuno ar bobl d'he broadelezh e vo ret krefvaat ar spered kevredel breizhat hag a zo ast dister evit ar peurluviañ. Kement darvoud ha kement komz hag a zoug testi- eni, er-maez eus strolladoù an emsav, d'ar prader gant mad ar Vrezhoneg, zo dour d'hor milin. Evit c'hoazh n'aus koulskoude tamm emskiant vroadel e stoum ar strolladoù-micher. Hag eus ar brezhoneg ne reont van betek-hen.

Etre an daou ez on evit reif ar c'heloù a-zivout ar paotr nemetañ da zilenn an amrouenn vrezhonek er vachelouriezh. Ha diskouez a ray pegen didalvez ez eo an aotre da zeskiñ brezhoneg ar skolioù ? Pa dastumet e vo pegen digas ez eo ar Vrezhoneg a-kefver o yezh ? N'heller ket kereziñ Bro-C'hall evit kement a ya a-dreuz e Breizh. Kement den speredet a oar a-walc'h, goude arvestif ur pennad, ez eo un tamm mat dre wall ar Vrezhoneg o-unan ma'z int meveliet ha kabestret.

Menegif a ran aotre da ober gant ar brezhoneg el lideriezh katolik goude ma ne wellan ket penaos e tegaso kemm e plag ar valeien da ober gant ar galleg. Ma vije bet gourc'hemennnoù digant an eskibien, pe urzhioù epis ! Ar pezh a gont eo e taerfe ar vrezhonegerien ! Ar pezh a reer en-dro da Gastell-Nevez-

Ar-Faou a dalvez dek aotre-eskob. Pa vo kant den paneveken e pep parrez o c'houlenn brezhoneg en iliz, ha fraezh, e vo lakaet bec'h war ar c'hallekaerien. Al lenner a skriva da Varr-Heol e oa arbat ober trouz en ilizoù avel 'o deus graet Flandreziz ne lavaran ket ez eo fall e ali, mat na gradan ket kennebeut e vefe ken efedus ha skouer Flandreziz. Ha daoust ha ne vez ket plagennoù ma vez santal ar gounnar ivez ? Ar re a rank gouzañv a-had o buhez en abeg ma'z eo lamet o yezh diganto, dre genwall ha lezober an dud a veli - klevit mat ! - o deus ar gwir da dserif e pep lec'h. Ar gwir ! Ar vrezhonegerien zo bet bousk-ognet peogwir ez int bet re seven a-viskoazh.

Ar velegeriezh kuit ha re war-dro Breton News a zeu war he fouezig da gaout an daol-gonter. "Mont difoun" a seblant bezañ ha ger-ardamez. "Ha gouest e viot da schuif ar stensiloù hiziv ? - O nann !" emezi o tantaf ha gwouz hag o sevel he deoulagad, evel pa vefe kablus. "Pellgomzit atev war-dro pemp eur, kement ha gwelout."

Distro d'ar gêr a kavon ur voestad hag a zo bet degaset gant post ar pakadoù. Anaout a ran skritur prim A.M. warni : eñ eo a skriv ar chomlec'hioù evit Breton News. War e ali e reomp gant goloennoù e-lec'h bandennoù. N'aus ket da ziwall e skrivfed re uhel pe re izal warno, ha buanoc'h eo bountañ ar skouerrennoù anno eget o gronnañ gant bandennoù. Evit an dispign, n'aus ket mall diforc'h.

Un notenn zo digantañ : n'an deus ket skrivet chomlec'hioù an dek kelaou-enn c'hall, rak ne blij ket dezhañ a rofad disklêriadurioù da C'hallaoued diwar-benn ar pep heverkaf a dramen e Breizh pe a vez graet gant strolladoù an emsav. Din da skrivañ ar chomlec'hioù-se mar karan !

Bloaz 'zo hepken hon eus lakaet ar c'helaouennoù-se war hor roll. Da gentañ e kasemp hor c'haleier dreist-holl da gelaouerien e London, mat anat e oa deut ne oa ket a karg ar re-mañ danevellañ diwar-benn Breizh. Allet e voemp gant kelaouennoù 'zo da gas ar skouerrennoù d'o c'henskriverien o Paris. Mirout anezho diouz ar C'hallaoued ? Atao ! Ur wech ma vazont bet skignet ne vez ket mui en hor galloud henchañ anezho. Ken abred ha 1960 e oamp anavezet gant Aux Ecoutes. N'aus ket pell ez eus bet gwelat ur skouerenn e ti ar c'honsul gall amañ. Miret diouto pe nann n'eo ket diaes d'ar C'hallaoued kaout krog er c'hennadig mar karont. Forzh penaos na vez sennañ nemet ar pezh a zo foran pe da vihanaf anavezet gant kalz tud e Breizh endeo. Ha ma'z eo aheurtet ar C'hallaoued en o mennadurezh enepbreizhat, svezhiokoc'h e vint marteze o c'houzout e vez brudet o doareoù dre ar bed.

A-wechoù gwir eo a choman etre daou vanez gant ar c'hwaserien a zeu war ma zro. Nevez 'zo em boe gweladenn digant un duardez voan kasketonnet hag a felle dezhi ma goulennata en anv ur gelaouenn-sebeziou pariziat. Disklêriadurioù reizh a voe roet dezhi, pe oa deroat he goulennnoù. Dav a voe din koulskoude taurel ur skramm-moged pa 'm atersas diwar-benn mererezh ar burev-kelaouif. Arabat d'ar c'honoc'her klemm ma troader gevier dezhañ.

Bruderezh n'hell ket bout e fedus ma chom skoachet ar bruder. Pa'n em ouestler da obererezh kuzh zoken e ranker dere'hel soñj ne c'hell ket ar rin bezaf miret kloz-kloz nemet labourat a rafed a-unennoù pe gant daou pe dri all hepken. Ur wrimennad arvar zo e kement stourm.

o o

Skrivet em eus da sekretour Skourr Kembre ar C'hevre Keltiek. Emaon o kas dezhañ ur skouezenn eus an destenn vreizhat hon eus prientet evit ur c'hounskrid d'ar Broadoù Unanet, a vezo displeget ennañ perak o deus ezhomm Breizh, Kembre hag Alba d'en em ren ha da gaut gwarez etrevroadel. Trementet em eus daou benndevezh el Levridi Broadel o klask en embannadurioù an Urzh-iadur an testennoù a c'hellfemp harpañ hor breud warno. Kavet em eus sturiennoù ha disentezioù hag a seblant bout lafsus deomp, met kaeliel int holl e doare ma n'hellomp ket e gwirionez pouezañ warno evit kaout krog war hor gwaskerien.

Dezrevellet hon eus koulskoude an arroudoù-se a penn kentañ an destenn vreizhat, e doare ur c'hentskrid, ha goude displeget dre ar munud, diwar bouez fedoù resis, peseurt gaou a ra ar Stad C'hall da Vreizh, e tiskouezomp e talvez e-keñver ar Vrezhoned ar maizad "bihanniver broadel" koulz hag ar gwir da zibab en em ren. hervez ma 'z int bet spisast ha degemeret gant Urzh-iadur ar Broadoù Unanet. N'ouzon ket hag eñ e c'hell breudennoù Skosiz ha Kembreiz harpañ war an arroudoù-se penn-da-benn. Kalz muioù'h a frankiz zo da skour evit ar c'hembraeg eget evit ar brezhoneg tra ma talc'h ar gouzeleig ul lec'h dister e mennadurezh ar vroadelourien skosat. Kinnig a ran d'am c'henskriver lakeat an arroudoù-hont boutin d'an teir zestenn, hag ober diwarno dezastumoù dishefvel hervez plegennoù pep bro. Forzh penaos e vo ezhomm ur raklavar evit bloazlevr ar C'hevre, a vo embannet ennañ an testennoù-se koulz ha skridoù all o tennañ da Iwerzhon, Manav ha Kerne-Veur. Ha gallout a rafe Gwynfor Evans e zarbariañ ?

o o

Seniñ a ra ar pellgomzer. Evidon eo.

"Ma anv zo... Klevet em eus e skrivit da lakeat ar Galted da genober. Menozioù hefvel hon eus. Peur e c'hellfen ho kwelout ?"

Da ziv eur hanter e kejan gantañ en Ti-Post Bras, dirak delwenn Kouc'h-oulan. Talbenn un niverenn Celtic News em eus lakeat a-wal e godell ma chupenn dezhañ da anavezout ac'hanon. Evit divizout e peoc'h ez omp d'ur c'hafedi dizarempred d'an eur-mañ.

E ziagentidi a zo anezho gouzeled, met eñ zo nevez-deut d'ar vro : desavet e voe en ur gêrbenn estren ha bevet en deus war an douarbras. Ober a ra gant un anv gouzelek-rik. N'eo ket sklaer ma'z eo bet adreizhet diwar ur stumm saoznekaet pe ul lesanv. E zisklêriadurioù zo souezhus. E dad en

doa stourmet a-enep ar Saozon, a-du gant an Alamaned, en eil brezel-bud; hag un contr dezhañ a gemeras perzh en emgann evit diaubif Iwerzhon e 1920.

- Me avat ne ran ac'hanon nag un Iwerzhoned nag ur Skosat. Ret eo sevel ur Stad Kelt. Gant pemzek milion a dud e vimp gouest da gevezata gant ar broioù amezek. Ahendall e vimp atav en o dalc'h. A-barzh 10 vloaz e c'hell bout graet ma fell deomp.

- Me zo diskredik. Ken buan-se na gemmer ket boazioù ar pobloù. Laouen a vefen ma plegfe o renerien da genober evit gonit o raziid. Ar pal-se a rankomp tizhout da gentañ.

Diskouez a ran dezhañ Celtic News ha Levri 1963 ar C'hevra. A-boan ma sell outo.

- Ra gendalc'hor da embann kalacuennoù. Mi avat a bourvezo ar f....où.

- Hag ar gadourien ? Daoust hag ez eus c'hoazh, er-maez eus ar vro-mañ, Kelted a ve prest da risklañ pep tra ?

- Ur rummad tud am eus. Hag alierien deknegel. Arc'hant a c'hall bout kavet. Diouzh ret, mont d'e skrapañ. Harp hor eus ezhomm.

- N'eo ket a-walc'h kregiñ, ret eo bout e-tailh da zerc'hel gant e grogad, pell a-wechoù. Evit se kaout harp un darn vat eus ho tud. En hon emsavioù e klasker c'hoazh gonit dre gaer.

- Dre gaer !" amezafi disprizius. Anaout a ran lod eus an dud-se. Da skarzhañ ! Hon enebourien o deus aloubet hor broioù dre hag ha n'o leoskint ket da vont e mod all kennebeut. Ret eo tagañ anezho. En o c'hêrbannoù. Ret a vefe o dic'hastañ rac'h !"

E zaoulagad zo strishaet, e ziwuz zo prannet-start. Lakeat on bet war evezh bremaik p'en deus lavaret e vefe roue war ar Galted a-benn dek pe bemzek vloaz. Dre ma tispleg e vennadoù ez on abafet gant an dreistmuzul hag an diboil ma'z eo un darn vat anezho. Ne blij ket din dislavaret krenn un den hag a zo youlet-mat, met ret eo din herzel ouzh e atizoù. Kounaat a ran raklavar Zarathoustra, e-lec'h ma ra ar prederour gant an erer hag an naer da arouezioù. Petra bennak a ve da soñjal diwar-benn e waled hag e galonegezh, en e boell n'heller ket fiziout. Kuit e feukeñ anezhañ e c'houlennan outañ hag amrouet en deus e gavelerien e-keñver kalon ha penn ?

- Ra n'anavezet ket mat anezho, ha pa ra diouer a skiant-prenet dezho, ez eo erbedet kregiñ gant mennadoù di'orc'h. Ma taouant da vat e c'heller heraat. N'en deus roet disklêriadur-kristaat etat, ha ne c'houlennan ket digantañ. Amañ e tleer mont difounn.

- An neb e hado ganin a sosto ganin", amezafi o kimiedif.

Pellgomz a ran d'an anaoudeg hag en deus roet dezhañ ma chomlec'h. C'hoant em eus da wiriekaat daou pe dri eus e lavarioù.

- Daoust hag ac'h anavezit an den ? - Na ran ket. - Petra 'soñjit diwar e benn ? - Re zievezhiek e komz. Re bar d'ur bugel. N'em eus ket graet penn outañ."

Egile a soñj moarvat : "Digarezerien ! Da skarzhañ !"

o o

Pemp eur eo. Ar burev-liesskrivañ n'emañ ket pell.
 Ar voleganez a vouc'hoarzh en ur zegas ar c'hwec'h stensil. Labourer mat he deus. Chom a ra plas evit ugent linennad bennak.
 - Lakaat a rin ur pennadig pe zaou da glokaat. O c'havout a raot a-gavret gant ar stensiloù. O zeurel a rin er voest-lizherioù amañ, en abardaez-mañ.

- Merkit pet skouerenn a vo da denañ."

Da bemp eur hanter em eus d'en em gavout e burev ur gwiraour, kenderv d'ur c'heneil ker-e-vro. Fellout a ra din komz gantañ diwar-benn ar c'houn-skrid.

- Bremaik e vo aze", eme ar sekretourez. "Koazait."

Amzer em eus da brederiañ penaos ober un dibun berr d'ar gudenn. Arabat din gwastaf e amzer. Met marteza ec'h anavez ar wiracourien an dielloù mat a-walc'h evit kavout un toull bennak e reolennoù Urzhiadur ar Broadoù Unanet ?

Deut eo tre, hir o-zremm, sioul e salud : "A-benn ur munud e vin ganeoc'h."
 Displegañ a ran hor mennad. "Harvez doare ez eus kevredigezhioù pe kevrennoù-skoazell hag a c'hell jubennañ en hevelep degouezhioù. N'on ket hep gouzout ez eus skoilhioù bras.

- Peseurt abegoù hoc'h eus evit an em erbedif ouzh ar Broadoù Unanet ?
 - Daou bennabeg : gwallegat e vez a-ratoz hon arboellerezh; hag hor yezh zo moustret, ken ez a da get."

Reiñ a ran skouerioù : al Lezenn-Stur nac'het; al Lezenn Doixonne difefedet. Nac'het e vez an holl c'houlennoù, habask hag all.

- N'hellomp ket jubennañ nemet torret e vez bet al lezenn gant ar Stad tamallet... Er wiracouriezh e tiforc'homp etre gaou ha disgwir. Ha pa rafe kelz droug d'ar Vrezhonez bout gouarnet gant ar C'hallaoued, n'eus ket a zisgwir keit ha ne doaz ket ar Stad he lezennoù.

Kefverit : ur meurvarc'had a vez digoret e-kichen ur stal vihan. Perc'henn houmañ a goll e bratikou, a lamer digantañ digantañ e vividigezh; un drez, met aotret eo gant ar frankizouriezh a ren arboellerezh ar rannved-mañ. Ne dalvez ket d'ar perc'henn bihan klamm dirak al lez-varn. N'eus ket a zisgwir.

Keit ha ma sent Breizhiz, Kembreiz ha Skosiz d'al lezennoù gall ha saoz n'hell ket an urzhiadoù etrevroadel ober menn evito. War an dachenn bolitikel gall pe vreizhveurat e chom ar gudenn. Kevrenn ebet eus Urzhiadur ar B.U. n'eo enteuliet da bliñ gant ho kounskrid.

Ne vefe ket moarvat ken didalvoud kas anezhañ da Guzul Europa. Met eno ivez, ma ne ro ket ar gouarnamant tamallet e aotre da selaou ouzh ar c'hlemmer, ne daer da neblec'h.

- Ar gouarnamant gall ne roio ket e aotre, kement-se zo diogel. Penaos e oa tremenet kudenn Aljeria dreist an diassteroù lezennal ha reizhadurel

e New-York ?

- Un emsavadeg a oa abaoe bloavezhioù hag ur gouarnamant an harlu, anavezet gant Stadoù all. Dre eno e ranker kregiñ.

- Spi hon eus evelato da denañ evezh ar broadoù all war hanvoud ha dienez ha stoum hon teir bro geltiek. Skignet e vo skouerennoù eus ar c'houn-skrid da gement pennadurezh a c'hellfe bezañ tust.

- Dalc'hit soñj neuze he deus meur a Stad kudennoù heñvel e diabarzh he hazzoù. Nabeut anezho o defe da c'honit ouzh ho tifenn....

o o o

Aet on d'un d'arn da lenn stensiloù Breton News. Mare koan eo, n'eus koulz lavaret praktik ebet e sal ar c'hentañ solieradur. Al lampoù a daol ur sklêrijenn wan. Azezañ a ran ouzh un daolig gresn nepell diouzh un dommerz tredan hag a zo klenket uhel ouzh ar vogez. N'eo ket eus skrivañ amañ, re zon eo ar gador-vrez'h.

Dre ma lonnan e notan pelloc'h ez eus gerioù da zivankaf. Amañ hag ahont, e-lec'h ma'z eus plas, e tloer klokaat an displegadurioù. Un darn vat eus ar c'helleier-mañ zo diwar-benn tud ha n'int ket broadelourien, na rannvroelerien kennebet. Ne gavan ket er c'helaouennoù ha kalc'hgelaouennoù broadel a-walc'h a fedoù a gomzfe drezo o-unan, pe a vefe pouezus a-walc'h evit tennañ evezh en estrenvro. O c'hafridi eo hep mar ober abostolerezh e Breizh, brutaat, broudañ, atizañ, kalonekaat. Pennadoù evel-se na zereont ket koulskoude ouzh Breton News. Seul nebeutoc'h az omp anavezet, seul strisoc'h a tileomp krouariañ ar c'helleier, ha seul fetisoc'h e tileont bezañ. Dre an dibab a reomp eus ar c'helleier ez eo untiek ar skeudenn a ginnigomp. Heñvel e vez ar gont moarvat gant kement burev-kelaouif, ha gant kement kelaouenn. Evit trec'hif d'an difiziañs avelkent, bezomp ken rik ha ma c'hellomp. Pa n'hellomp ket gwirikaat ar fedoù, merkomp e palec'h hon eus o dastumet. D'ar re a garo mont d'an andon.

Evit leuniañ an niverenn-mañ e lakain ur pennadig diwar-benn Gorsedd Pempont. Moarvat ez eo ken dellezek a vazañ brudet hag ar Bleuñ Brug, hogen n'on ket evit mirout a sevel un nemed a-zivout lec'h ar galleg en o bodadegoù. Divarion e kavan ober gant ar yezh-se evit pleustriañ ar geltiegezh, evit ez-taolañ ar spered kult, dreist-holl dre ar vrezhonezh. Hag evit schuif re vo meneget prezegenn maer Brest peogwir e tisklâr ez eo deut disker Breizh da heul he sujedigezh klok da Vro-C'hall. A-berzh maer ur gêr vras ez eo kredapl-oc'h eget a-berzh "otonomisted". C'hoant om eus da staoniñ en abeg ma c'hell an den meur-se komz eus al "Liberasion" en hevelep tann-anal hep skrijañ, met dav eo din bout fur, ha rakvoudek. Ma stagan da brezag e vo re a zenzvez hag e vo nac'het ar vizskriverez.

Warc'hozh, a verken dezhi, a traañ ar follennad difezisdennoù, e pell-gomzin da bemp eur evit gouzout ha graet eo al labour-liesskrivañ.

o o o

E pelec'h ez on chomet kan diwezhat ? Ar re all, er gêr, o deus debret o c'hoan.

D'an div verc'h henañ d'ober o foelladennoù-skol, hag e rin ur gentel vrezhonek goude.

Kintilla a laka hec'h evezh da zeskiañ hor yezh. Niamh avat ec'h ouzer diouzh hec'h arvez ne deo ket gwall-c'hredus. Luskaf a ra war he c'hador, dre laer e lenn he levr darvoudoù pe e ra tressadennoù. "Emañ o selaou", emezi. Gwir eo e kouna ar gerioù kenkoulz hag he c'hoar, mat n'eo ket ken akuit da respont gant frazennoù.

Aet e oamp betek kreiz Cours Elementaire Roparz Hemon. Re vuon. E-lec'h adkregif, e rejomp neuze gant ar Methode Rapide : kavout a rae din e vefe aesoc'h o lakaat da gemer perzh oberiant er c'hentelioù, da sturmaf frazennoù dishefval war batrom ar re a zo al levr. Goude dek kantel o deus goulennet ouzhin distreiñ d'al levr all. Lakaet e vezont bromaf da lann pennadoùigoù. Boaziet int ouzh soniadoù ar brezhoneg, nemet an u zo diaes da dapout. A-wechoù e lakaen pladenn ar Gerlenned "Kanaouennoù ha Rimadelloù" - Plijout e ra kalz dezho "Marijanig Lagad Bren" ha "Disul ma oa pinvidik". Gwechoù all e lakaen hini Tricoire-Roparz hag a zo distilhet-fraezh, met hep dale e vezomp dielc'hat ganti - n'em eus ket tu da horzal anezhi ha da zistreiñ war-gil hep risklañ krafadennoù.

Gant an trevoll hag an difrae a vez warnomp ne dizhan ket ober muioc'h eget ur gentel pe ziv bep sizhun. Ha na badont ket muioc'h eget ur c'hard eur pe un hantereur. Gwelloc'h eo d'am soñj ober krogadoù berr eget reoù hir, gant aon na deufe ma skolidi da ereziñ. Gwelloc'h din c'hoazh komz brezhoneg outo dre voaz, evit an ezhemmoù pemdezies. Tamm-ha-tamm e vez graet.

Evit o atizañ da zeskiañ e levrer dezho e vezint kaset da Vreizh evit o ehan-skol pa vint barrek da gomz brezhoneg.

oooo

OLIER MORDREL

UN DEVEZH IAD EN HARLU

N'ouzon ket hag e teuin a-benn feteiz da seveniñ va hunvre aheurtet : chom peg ouzh va zaol-skrivañ a-hed an deiz, c'hoarvezet a c'hoarvezo.

N'eus netra din da ober diwar zifrae. A-bell e stlak skubelenn ar mitizhien ouzh koadiri ar sal veur. Frank ar gwelva. Kudenn ebet a-wel. Va gwreg a bled gant kerzh ar wik-efre. Pep tra klenk ha war e du. Ha mestr e vefen feteiz d'ober va c'hoant en diwezh ?

Em c'hador-vrec'h a-dal d'am skriverez. Paperennoù a-strew, levrioù digor en-dro din. Nav eur. Ne vin ket direnket. Marteze.

Marteze... Marteze... Adarre ar ger iskis-se o trubuilhañ ac'hanon. Perak un -t- ? Da c'hortez e oa un -d-. Splann ar gerdarzh : marteze a zeu eus mar-deo-se. E galleg : peut-être, e saozneg : may-be, e kastelhaneg : puede ser. Bep tro an elfenn verbel bout. Amañ mar, anv-kadarn oc'h arouezañ an amzivin, gant ar gopulenn isklevet. Splann, henn adlavarout a ran. An -d- koulskoude ne halle ket mont da -t- etre voalennoù. Piv a zirouestlo al luziadell-man ?... Netra er Glossaire, netra

e Geriadur Istorel ar paotr kozh, netra e Pedersen ha Lewis ha nebeutoc'h c'hoazh e Jackson. Evit ar gwel, o deus holl tec'het diouti... Pemzek vloaz ma vezan o treiñ ar gudenn em c'hokenn hep kavout penn dezhi. Digarez ouzhpenn evit ober war-dro traoù all... Ar gazetenn dispak war ur gador... Se confirma... al lep bras a weladenno an Arc'hentina e miz here... Emañ daou vezeg, polised ha Penn-ar-protokol en o hent evit prientiñ e veaj...

Gant beg va zroad e kasan ar gazetenn da nijal. Gwell c'hoazh lakaat va spered gant marteze. Dianav ar ger e kembraeg, hogen ken anavezet e kerneveureg hag e brezhoneg : martesen, ma emañ sen par d'ar gwenedeg. Ar ger a oa anezhañ, dibgel, kent rannidiñezh an div bobl...

"Gwaz ar porzh" o c'houlenn digor.

- Petra ze ?

- Emañ ur señor ouzh he klask. - Aze emamp ganti !

- Mont a ran - a zistroan distoum.

Ar señor a ginnig din bilhedoù evit ul loteria bennak.

M'en kas da sutal brulu war gern ar Pan de Azucar.

En-dro ouzh va zaol-skrivañ. An -t-se ne hall ket dont eus d-ec, na, eus deu, daoust ma vefe dedennus an -su-. Eza, eza, ma kendalc'hon da randoniñ evel-se ned in da neblec'h. Tremen arre emlakaat ouzh traoù all.

- Tok ! Tok ! adarre.

- Petra zo c'hoazh ?

- Señora an Nn.11 a garfe komz ouzhoc'h.

- Pelec'h emañ-hi ?

- 'Tal ho tor.

Ar vaouezig savet war he seuliou ha gwask ganti war hec'h anal :

- Un tamm plastr bras a zo kouezhet war va fenn diwar

lein va c'hamb, ha me o paouez dont eus ar peluquero !

- ¡ Que barbaridad ! Me ho ped da grediñ ez on keuziet-

don. Ez in raktal war al lec'h da gemer an diarbennoù ret.

Ha me o tezoegen ar skeul ha bremaik war al laez anezhi.

Gleb ar gorread. Kousiet. Ur pezhiañ plastr a zistagan a

gouezh a-dammoù. Ur faoutenniñ a zo sur en dar-do, a silas

dour drezi. Gwenn-holl eo va fenn ha va divrec'h.

Mouezh skiltr va mabiñ a sav betek ennon :

- Tad ! Deut eo paotr al lizhiri !

Kerkent ha klevet en em gavan e traoñ ar skeul, hag aet war va brusk ouzh aspled an hall o c'hervel va gwreg :

- Dra bennak 'vidon ?

- Vidon-me, deus ar Gelveneg. Fotoioù zo barzh...Traoù moulet vidout... A, yao... Ol lizher deus Kastellin...M'oe ke g'el... Digann Abanna sur wac'h...

N'eo ket sonet c'hoazh eur an ebatoù. En-dro gant va labour. Da gentañ, skubañ a-zevri ar c'hamb kent pigat war al leur-doenn... Eus a beban an -t-se ? Peseurt traoù moulet ? Ar Vro marteze ? "Marteze" c'hoazh un taol. Ha c'hoazh an -t-se. N'eus ket a verb, e ster bout, o ternaou gant un t- e pred-eneg. En iwerzhoneg, eo. Tá thrathóna fliuch an. N'ankouaan ket kentelioù Summer School Bunbeag. Me oa pevar bloaz warn-ugent neuze. Ur poñsin. Miz gouhere e oa ivez. Glav bemdeiz. Avel fresk. Mored put o sevel eus an oaledad taouarc'h hag o leuniañ ar sal. Delt al linselioù. Tá thrathóna breach an. Ya, brav e oa an endervezh a bell da bell. Ar veserezh yaouank bihan a gorolle hec'h-unan war an tevenn, o kanañ, beuzet e-barzh ul lagadenn heol, a spluje warni eus un toull er c'hoabr-ennoù du. Ehanañ a ra p'hor gwel o tostaat ha kemer an tec'h !

Me pigat war al leur-doenn. Yen an avel, hogen ken kadarn an heol hag e Breizh da seiver pardon Santez Anna. A ! Aze 'mañ 'r faoutenniñ, etre div garrezenn. Hogos netra. Mizioù zo evelato m'en em sil, takenn ha takenn, an dour drezi. Adplastrañ hag ad-gwennañ lein-plad an Nn. 11 a vo ret ober kerkent ha ma sec'het... En iwerzhoneg ez eus tá, pa reomp-ni gant emañ, bez... Gant ur gwelad yod-dizintrus e vo graet an dro...

Deut on e diabarzh an ti da klask binvioù ha dafar. Ostizien, a-stroll en trepas o troc'hañ an hent ouzhin,mous-c'hoarzhoù tonius war o fias. A-tor : Felicitaciones... Felicitaciones... Hag i da stardañ din va daouarn gant displeg bras a from.

- ¿ Que pasa ? ¿ que pasa ?

- C'hwi zo 'vont da evañ champagn ?

- Da belec'h ? En enor da betra ?

- D'ar C'honsulad Gall, na petra 'ta, evel holl C'hall-aoued kêr, en enor d'ho fiesta patria !

- Biskoazh kement-all ! Ar c'hatorzjuilhe eo hiziv ?
N'ouien ket. La toma de la Bastilla ?... El día de la Liber-
tad, eh ?

A-gor : - ; Exactamente !

Ha me kuit, o lezel a-dreñv va c'hein tudoù dihetet
a-grenn.

Adarre war gein an ti, oc'h astenn ar gwelead yod diz-
intrus war an torradur... Nag e kembraeg, koshañ ne gaver ur
furm gant an t-derou... Gwazh a se... Yao 'hat, va faotr,
yao 'hat ! Ez eus taw, breur da iwerzhonek ia. Ret mont da
bennaouñ em levrioù... Du-noll eo va daouarn bremañ...
M'henn argas... An aw kembraeg a zo o e brezhoneg, hag o a
zo aet da eu, ha pelloc'h da e. Nogen peur ? Penaos ? Ne vern
ket. Diroustlet eo ar gudenn. M'henn klev em c'hig. Me a
ziskenn en ur ganañ.

- You lokk very happy, Mister ?

Saozez kozh ar gambr 17 a sell ouzhin drev an tamm
anezhi.

- What happened ? Could you be in love, you old rover ?

- You're damned right, dear old girl, in love with
everything.

- Does this include me ?

En diaz o renkañ va binvioù. Eus ar rakgegin e tibouf
va fried.

- Na te zo lor, Oleier. Kiers da'n em velhi dustu !

Dan an dour o strinkañ tomm-grizias a-hed va c'hroc'hen.
Va fenn gant al lizher an gortoz war va zaol. Ar soavon o
vont en-dro. Va fenn gant to > te... Ha gerioù all a zo a ro
skouerioù eus an emroadur-se ? Ya, novid a yeas da nevez.
Ned a ket. An dro-mañ e c'hoari kontammadur an o dre an i...
Peseurt "traoù moulet" ?... Al Liamm a hell bezañ... Ne'z a
eu da e nemet e Gwened-Uhel, teuz > te... Er c'hontrol e
KLT e kaver e o vont da eu, gant es > eus. Ur skoilh eo...
A ! Ret eo din mont da greizkêr. Ankounac'haet em boa. Ur
roll am eus savet dec'h da noz... Lavaret koulskoude a zo
aet da leveret e Kernev. Eleze, a da e war-eeun dre heson-
erezh. Hag e vije aet *mar-ta-se da mar-te-se ken abred hag
an henvrezhoneg ? Gwazh a se e chom levrioù ar Pleuriot-se
war ar stern...

Me zo 'vont d'am c'hambur-studi o sec'hif va blev...

Hag ar gourfenn -oc a yeas da -guc, ha goude da -ec... Hag
e stokan ouzh al laezhour, anezhañ ur paotr tec'het eus
Sikilia e 1946, goude m'oa aet da fall an emsavadeg a-enep
an Edal. A-boan ma oar sinañ e anv. Nogen e oa er menezioù.

- Evviva la Sizilia ! emezon-me

- Evviva la Bretagna ! a zasson va c'homper.

Ur seurt lid etrezomp, na intent gour ebet. Pellant a
ra gant boutailhoù goulio.

- Eh ! Antonio !

- Petra zo ?

- Troet eo din ul litrad laezh neizheur !

- Si ? El calor, señor !

- El calor er goañv ? Te zo 'farsal !

Pell emañ. E troan penn war-zu va faou. Kerc'hat a rin
e-barzh Pedersen. N'eus ket koun e vize netra e Morris Jones...

- Rrrinn... Rrrinn... - Ar pellgomzer er Recepción.

Ul lamm.

- Erbedet eo bet din hoc'h hotel. Ha tian a rafec'h daou
ze, me ar vamm ha va merc'hig a drizek vloaz ? Evit miz pe zaou.

- Va digarezit, itron. N'em befe netra da ginnig deoc'h
hiziv an deiz. Hag e ve ho madelezh gervel adarre warc'hoazh
pe c'houde-warc'hoazh ? Spi am eus...

En diwezh ouzh va zaol-skrivañ. Unnek eur hanter. Ya,
digant Abanna... Tonkad 64... Un devezh eus va buhez ? Piv
er glenn-mañ a vefe houlet gant danevell un devezhiad disliv
eus buhez reuzeudik un harluad ? Ur paour kaezh den o vandr-
ouilhat droukhirmez, oc'h en em gannañ dibaouez etre daou
benn an deiz da laerezh digant an amzer un eurvezh bennak da
vezañ eñ e-unan en-dro ?

L'Avenir. Diouzh a hanval e fiñv bremañ ar bobl. Peda-
vare e fiñvo ivez an emsav ? Gwezhall e selle an dud ouzh an
emsaverien o tremen. Bremañ e sell an emsaverien ouzh an
engroez o tibunañ er ruioù. Pegoulz e vezint gwelet holl a-
gevret ?

Ar Bed Keltiek. An tamm lipous-mañ a lennin goude debrif,
en ur sunañ va banne kafe.

La negra e toull an nor :

- A almorzar, señor !

Ha gant ur mousc'hoarzh goapaus :

- Hay polenta hoy !

Goût a ra ervat, ar pezhig fall, n'on ket evit lonkañ

ar yod-maiz-se, o neuñ e-barzh ar salza tomates a zo hanter eoul, ha serr e vefe ganin va daoulagad ha va fri.

- Bueno, gracias, ya voy !

Petra respontin d'an doktor ? Diskouez va zeod dezhañ ? Ne rin biken. Neuze kontañ an devezh-mañ da skouer ? Goude-holl ne c'houlenn netra all diganin. Ra vo dezhañ eta an devezhiad-mañ en arlu. Hep h. Henvrezhoneg : arlu. Kembraeg arluo. Piv an azen a gabellias ar ger-mañ gant un h na voe biskoazh anezhañ ? Un h didalvez, ankounac'haet, tra ma voe tennet diouzh gerioù all, evel heñ. Urzh a vefe mat lakaat, ya. Ma, e-pad an endervezh pa vezint holl gant o c'houk-ae, e krogin-me em fluenn.

Div eur. Emañ va merenn o tiazezañ, ponner a-walc'h daoust ma oa dibolenta evidon, dre hegarated ar patrona. War va gwele, damastennet, e tigoran A.B.K.

Dibrennañ a ran ul lagad. Kousket e oan ? Ur sell ouzh an eurier. Sac'h an diaoul ! Peder eur ! Tapet on bet. Buan em sav, din da vont da greizkêr diouzhtu. Ar skrivañ a vo goude koan. Ur sell ouzh an traoù da ober : an ti-post, an alc'houezerezh, ar pintureria, setu holl. Me gar monet war gefridioù e kêr. War vale pa c'hellan. Va-unan-penn gant va bed-me. Bleniet en-dall gant va zamm paper eus ul lec'h d'un all.

Mouezh va gwreg :

- Râbet dit dijoñjel er c'heso de rayar ! N'eus ke mu ! Fidamdouille ! N'emañ ket ar c'heuz-da-rasklañ war ar roll. E-lec'h va em gavout war ur blanedenn all, e vo dao din chom war homañ o "choñjel" er c'heso de rayar ! Gwall blanedenn !

Ar straedoù o tihuniñ eus ar siesta. Niverus-ouzh-niver-usañ ar c'hirri-tan hag ar brenerien er stalioù. Dre voaz e taolan ur sell ouzh talbennoù al levridioù. Ar best-sellers : Pulitzer, Goncourt... Troidigezhioù holl... Un heklev eus buhez ar pobloù all eo buhez speredel ar vro-mañ... Ar Sagan, evel-just, aze, ahont, dre-holl... François Mauriac... ar Youenn Olier gallek... N'eus nemet an daou-mañ e Bro-C'hall ? Pa gavan ul levr gwizion, skrivet gant ur gwir zen en e brenan. Pa gavan.

O kerzhet, e kouezh va sell ouzh va botoù. Dro all, n'em eus ket o lufret a-raok mont en hent. Gwashañ zo, me zo aet

e-maez diskabell. Va blev digempenn ha dic'homina a embann va mezh d'an holl. Ha va brageier ! Pell zo m'eo aet diwarno ar pleg feret gant ar c'hemener. Implijidi, er stalioù, n'am anavezont ket, dizamant ouzhin, a bled ganin p'eo deus amzer. Ur peón, a soñj dezho.

Ha kenderc'hel gant va zro.

Mar gwelfent va daouarn... Den ne rafe ur c'haballero ac'hanon ken... A ! kaoc'h ganto !... Hem !... Kement-se a zo lore'h ha gouennelouriezh... An taxi-mañ en deus va spinet... N'ouzont ket blenian er vro-mañ... Petra lavaran ?... Fangio n'oa ket Japanat !... Kant bro, kant kiz...

- La hora por favor ?

Ur paotrig a stok ouzh va brec'h da c'houlenn an eur ouzhin, o parañ warno e zaoulagad bras-du, mongolek o stumm. Merc'hed ouzh va distremen. He a wel o c'heinoù tra ma pell-aont. Ar penn sanket etre an divskoaz. Ledanoc'h o dargreiz eget o revr, trest-kagn o divesker gell warno roudoù arc'hilas ar c'hlevedoù kroc'hen. Hag o blev du-pod, ken reut ha reun...

Arabat din ober fae war va lore'h... Va c'hile diwezhañ... N'en deus nep tro va dilezet... Ur barzhoneg a savin dezhañ... Ar peul ouzh va skorañ... Ar brezelour difaezh... Ya, mont brav a ray...

Ur sell strantal ouzh va taperenn. Kaset da benn kement tra oa d'ober. Ul lamm e-barzh ar 62 am diskenn dirak va zi. Mall warno adkavout va levridioù hag adkregiñ gant va enklask. Ar gwir vuhez. Erru on. Dir ha tan ! Hag ar formaj ? N'eus forzh, ar mevel a gasin da brenañ un tamm.

Dudiusañ koulz an deiz. Endrammet gant an noz. Nebeut a drouz en ti. Peoc'h va c'hambr defival, enni an daol nemeti sklerijennet evel ur melezour-dour dindan an heol. Va zaol garet, va c'heneilez an deizioù amladen, par d'ur prenestr digoret war dremmwel skedus va hufvreoù. Gwelomp Pedersen. "Its cognate seems to be W. taw, 'that is'". Se eo se. Toc'hor e oa ar ger e kembraeg krenn kentidik. Nep souezh ne gaver roud anezhañ e brezhoneg krenn. Brenañ ur sell ouzh Atlas ar Rouz. Ha n'em boa ket klevet martheuze gwezhall e Skaer ? Re vraz e vefe. Gwelomp. Kartenn 448. Ya 'vat ! Ra vo meulet ar santissimo nombre de Dios ! Va martheuze a gaver e Gouelou hag en holl reter Kernev eo bet notennet matreuze, gant metatezenn an -r. Kavet eo eta ar mell a vanke er chadenn etre *-to- ha -te-. Martheuze a zo aet da martheze dre hesonerezh. Enskrivet

eo istor ar ger war ar gartenn. Ne hellan ket proufi e teu an -te- eus ur verb *-tā- kozh, hogen e hell bezañ ha n'eus diskleriadur all d'ar ger. Hag ar mar-se gwenedek ? Ne hell dont nemet eus *mar-is-se(n) (1), o vezañ ma chom divouezh an -s-. Diaester ebet. Ha diskoulmet e vefe da vat ar gudenn gozh ? Mor a levezet.

- Le estan esperando para cenar, señor.
- Mat-mat, mont a ran diouzhtu ! - Bilgeriet em eus e brezhoneg...

Goude koan, e teu an daou studier, Abraham ar Sionour, ha Sergio, a oa gall e dad-kozh hag a zo dezhañ spered lemm ar ouenn anezhañ. Dont a reont evel-se aliss da noz, war zigarez pe zigarez, evit chom pelloc'h da varvailhat ganin, dirak pep a vanne. Diouzh ar voaz e tiazet ar c'henbrezeg war draoù Israel, peogwir n'en deus ket graet war draoù Breizh.

- Daoust hag e kred deoc'h, eme Abraham, ez eo ar Malcolm, kemeriad Exodüs an unan den hag Orde Wingate, an den gwirion a gig hag a eskern ? O daou a ra war-dro urzhidigezh ar bar-anrez hebreat, hogen ez eus disheñvelderioù.

- An disheñvelderioù a gaver atav etre an istor kras hag an dezrevell gempennet. Me gred-me eo buhez an eil den drevezet diwar buhez egile.

- Ne gomprenan ket, eme Sergio, penaos e c'hell ur Saoz, ha gwellañ zo un ofiser saoz, karout ur bobl estren mui eget e hini, betek kemer tu an Hebreiz a-enep ar Saozon end-eeun.

- Fazioñ a rit. Wingate ne oa ket saoz, skos ne laran ket, ha pan aozas Uris e romant e roas un anv gouezelek d'e haroz. N'eo ket diouzh ar Saozon o emreiñ da silvidigezh pobloù all e koll mad o bro-i. Kelt e oa Orde evel ma oa Lawrence an Arabia, hanter iwerzhonat, hanter gembreat. Diwriziennet diouzh hengoun ha sevenadur o gourdadoù dre un diorroidigezh beursaoz, o deus gwalc'het o c'hoant d'o emouestlañ da ouenn an dud, evel ma voe gallet dezho. Wingate a voe entanet gant e feiz dall

(1) Goude din studiañ an teulioù henvrezhonek embannet gant an Ao. Fleuriot, a kredan e vefe kentoc'h (is)-mar-(eo)-se(n) andon mar-se, gant is kouezhet abred hag eo isklevet, an s o chom divouezh goude (i)w da gentañ ha pelloc'h goude r, kement-mañ o vezañ n'am eus ket kavet is goude e rener. E hellfe bout a-hend-all e vize (is)-mar-(it)-to-se fuzm kentidik mar-teze. En div blegenn eo anat se ar rener hag an ak. mar a zo doare-enn. Ar fuzm verbal to a lavaz. S. an Dictionnaire des Gloses p. 312, hogen an Ao. Fleuriot n'en deus ket a vezet. O.M.

er Skritur Sakr. Lawrence dre e garantez evit ar gouelec'h ha boazioù dibar e annezidi. Bro-Saoz ne oa netra evito e kreiz o c'halon.

- Dezertourien vil eo bet an dud-se, memes tra, eme Sergio gant lojik e vad, peogwir edo e-keit-se o bro-inti dindan ar yev.

- E sell ar Gelted, trubard eo ar C'helt a stourm evit frankiz Keltia p'en em gav o gwiskerien dindan bec'h ur brezel.

- O dever a zo eta mervel evit o gwiskerien ? Ur ouenn dibaot eo ar Gelted !

- Ur ouenn vazhyevet ha lorc'h anni. Ac'hanta, paotred, c'hwi 'm digarezo, ma' z eo ret din bremañ mont da skrivañ. Tost da zek eur ! 'Benn arc'hoazh !

Gwaz ar porzh e toull an nor.

- Kibellec'h Nn. 3 a zo "graet ul lenn", patrôn. D'am menno eo tarzhet san an dour yen.

- Ez an da welout.

o o o

KEIT HA M'EMAÑ AR GALL...

Un doumpi herrek war-laez : engann e kamb ar baotred. Youc'hadennoù, yudadennoù. Un dra bennak evel sîzh eur hanter e tle bezañ. Poant sevel. Evit bagol n'on ket. Re verr an nozvezhiad kousked. Labour noz ? Pedet d'hor c'hoan e oamp e ti D., mezeg. Ne c'hellomp ket nac'h bep tro, hervez. Meziñ a'r meziñoù, skuizh, oc'h alkolegañ, o gwraez o rodal. Ur surjian gall, bet en trevadennoù : "Ce soir-là, ma femme était à l'Association Française... vous vous en souvenez, ma chère ?" Breizhiz : "La femme du sous-préfet est formidable.. nous dinons justement chez eux avant-hier" (stad a c'hell bezañ e kour ar Porze zo tad da honnazh)... C'hwec'h survezh pad. Nann, ne c'hellomp ket nac'h bep tro, eur mat. Hag e teu din da goun gwerzenn Kongar : "Keit ha m'emañ ar Gall..." Un torr a zo aze, em buhez, ha poan am aus....

Lein. Skol. "Tro piv da seniñ ar c'hloc'h ?" Desiz an dibunedenn eo.

Goulo an ti,
Goulo ar gambr,
An tan-as hepken, 'barzh an c'halad...

Geno, sîzh vloaz, a blij dazhi kalz Meavann. Evit Gwihen, nav bloaz, ne gilan rak reiñ dezhañ traoù muioc'h prederiet :

Liamm an neñv hag an douar,
Te, danvez etra deou....
Kalc'hiad ha gouder pep buhez....

Aze, gant kelc'hiad e rankan reiñ displegadurioù hirik, pell marteze diouzh mennoz ar barzh. Marteze na goune ket hemañ kelc'h tro meurdezus an douer er vevgimiezh...

Nav eur hanter. Amzer da lavarout kenavo da C'hizella er sal o reif ur skrivadenn sifrou da Iwan, pemp bloaz. Ha d'ar c'hlañvdi. Eno e vin skoliad hiziv. Penn hon imboure'hva tredanempennuniañ, bet e Kendalc'h Köln, a vod mezeion ha kalvezourezed an ti evit displegañ dezho ar pep nevesañ war an dachenn. E-pad pemp devezh e voe prezeget ha dealet du-hont e Köln evit disoc'hañ gant ar c'hael nevez-mañ : ouzhpenn ar gwagennoù reol hag ar gwagennoù kleñvedel, e ranker savelañ un trede rumm, ywagennoù direol hep bezañ arouez kleñved ebet. Ha pouezus eo.

Tro ar c'hambrou, embrouget gant daou glañvdiour. Klañvourez ar 103 (melkonni lemm ar paouez-mizioù) a gomze brezhoneg ouzhin en deizioù kentañ, zo krog da c'hallegañ : arouez ar pare o tont; distrañ a ra d'ar Gevredigezh.

Teir c'huzuliadenn am eus da reiñ etre kreisteiz ha trizek hanter. Ur Gall, beajer kenwerzh, a zeu da fiziout ennon, bep tri miz, pa dremen er vro, kydann e lentagezh. A-wezhioù, pa son ouzh dor un arval, e krog ar spont ennañ, tec'hout a rafe... Gwelloc'h ez a abae ar wezh diwezhañ. Sellout a ran ouzh e fichenn... Dont a ra din a greiz-holl koun aus va emziviz gant C. daou viz 'zo, aus e gelennadur war an aberzh : holl omp aberzhidi hag aberzhourion; kasomp hor c'hoari gant ar brasañ doujañs, pe aberzhidi pe aberzhour e vemp. Ha gwelout a ran va beajer kenwerzh aze gwisket e soudard gall... Laouen on o klevout ez eo gwellaet. An eil, ur vigoudenn pergont pemp bloaz, a oa aet gant ar gwin ken na oa mezh ha zud, kuitaet ganti ar c'hlañvdi pevar miz 'zo, a zeu da ziskouez din he deus dalc'het mat, war zour bemdez. Tu ebet d'ober dezhi azezañ; tro an daol a ra evit "preg" ganin a-dostoc'h. Tamm mezh aus he brezhoneg; fouteur kaer ne ra aus doareoù ar Gevredigezh. Stekif a ra he darn ouzh va skoaz bep ma tibun hec'h istor, o klozañ pep frazenn gant : "te 'wel, Etienne". An trede kuzuliadenn, teir flac'h aus Douarnenez o tont tre, ront o fas, ront o divrec'h, ront o divglun, oc'h azezañ o-zeir e teir c'hador-vrec'h ar burev; stagañ o-zeir da gomz a vouezhioù skiltr ha, bepred a-unan, dirollañ da yudal. Na voizan grik. Kammedoù avazhiek ar c'hlañvdiour a glevan en tu all d'an noz.

D'ar gêr. Tra ma tebran va merenn e teu va skolidi da ziskouez din o c'haieroù, da zisplegañ o dibunadennoù. Digorif a ran pakad ar fakterour...

Kloc'hig an noz. F. eo. Bloaz emañ er vro. Goude dek bloavezh e Gall ma renas imboure'hadennoù war ar vevoniezh. "Va flas zo e Breizh". E Breizh

en deus digoret un arnodva kenwerzhel. Ha kenavo d'en imboure'hadennoù. Labourat a ra evit ar vezeion. N'eo ket kleizhannet c'hoazh ar goullir, setu perak a teu da'm gwelout alies, me a zo tremenet dra ano araozañ. Hiziv avat, ne dou ket evit komz aus ar mare-hont, oad sours ar meiz. E fulor emañ. Gant tud yaouank an Emsav. "Leziregezh, disevendad, setu o fennberzhioù. Klask bod a di da di, pismigañ, korbinat ha landreantif, ken dizask ha me vezont disuj..." Ha kenavo da Zouar ar Promesa touellwalet diwar glannoù Saena.

Dres e togouezh Frañseza. Emañ o tremen, o vont da "Journée d'Etudes du Bleun-Brug". N'eo ket unan aus ar ra yaouank-se a haug F. Kement gwazh ma c'houlenner diganti ul labour ez asant hag an gra gant aked. Da vroadelourez an em laka hec'h-unan. Souezh va c'henseil. Frañseza a wink, a daera : "Me fell din gwelout petra dremen gant ar re-se". "War urzh piv ?" ama F. Souezhet ar plac'h d'he zro. "Nebaon, ne vin ket kontammet. Me zo kreñv. Didalvoud a-grenn evit Breizh eo ar re-se. N'emaon ket a-du ganto". Aet eo ruz.

Kimiadiñ a ra F. Da glask ul loc'h all evit terriñ e gannar. Frañseza, hep sellout ouzhin, a ya war-du an nor ivez. "Mont a ran d'ar gêr en-dro". Ha neuze, o treiñ trumm war-du ennon, gant un disterañ sinema : "War karfe d'ar re gozh soursial muoc'h gant ar ra yaouank". Krog a dapan er c'harr-babig a gavan dres en trepas : "Deus, va merc'hig, deus, ma'z kasin War-du ar Pal"...

Pignat a ran da'm burev, urzh roet en traoñ da argas neb a zeufe... A-vec'h digor va zeulidod ma harzh ar c'hi er-maez. Trouz ur c'harr. Titirin... Mouszh kilhog tofioñ Laou. Parc'hann un ti krampouez-dantelezh e Kemper... Brudet evit e daolioù nay... An diwezhañ hini a voe kas ur voestad ramzel a gompouezh d'ar General de Gaulle... Lorc'h ennañ e tiskoueze d'an holl lizher trugarekaat an Elysées : "Ma 'gredfe a-walc'h emañ ar brezhoneg o vont da vezañ lakaet er skolioù en dro-mañ"... E skiltradennoù a dreuz simant, ha moïn, ha plastr ha koad... "A : Kasaus eo ! c'hwil oar ! Me oa deust da c'houlenn e anv evit hor strollad navez : an S.B.S., Strollad boullourion Breizh..."

Meur a daol pelligomz. Unan : "...ya, skrivet ho pos da'm medisin evit an ordrenañs. Kavet eo bet marv ar beure-mañ... Ya, marv... Petra ober... Rak droug penn am eus atav, ha poan am bez o kousket... Skrivañ d'un all..." Evelkent ! N'eo ket seven bavañ.

"Tadig, ouzh taal !" Nav eur eo. Tizhet am eus kaout pemp eurvezh peoc'h. Pemp lizher am eus skrivet ha tregont fichenn am eus graet. N'eo ket kalz. Hogen, ouzhpenn un eur hanter on chomet war ar ger deyou, - ha n'eo ket an eurvezh kentañ e dremenan war er ger-se. *De-but, adosse, bezañ aze, bezañ da. Kavatal evit un darn aus e sterva da "Dassif". Evit un darn all da "Gegenwart". Hogen ivez, evit un darn all da "Factum". Evit un darn all da "causa" ha "Ursache".

Evit un darn all... En agor a ziraezer e penn an "Diren Eidetek" e tilec'h-ian gant kement a boan hag ur c'hoz a kondon an douar, ha koulskoude na glaskan nemet un dra : dibredañ diwar sterva pep ger evit keout e neuziadur dindan va selloù e-lec'h chom luget ennañ evel ur gelienenn en ur gwriad kevrid.Pout on o kas seurt labour. Un tammig nebeutoc'h marteze bremañ dre forzh embreger; poanuis-dreist e chom din. Koulskoude, n'eus nemet an hent-se, an Diren Eidetek diskuliet gant Husserl, a gement a rofe an tu da dresañ rusis bevennoù ha"tor-osennedur" sterva ur ger. Ar sturyezhouriezh heptañ n'eo nemet c'hoari mouchig-dall...

Mousc'hoarzin a ran gant ar plijadur o soñjal e L., imboure'her yaouank, diskibl d'an anadennonour Michotte, a fell dezhañ danevallañ e enklaskoù e brezhoneg. Stad a vo ennañ. Mousc'hoarzhin a ran ivez o soñjal e rener Kannadig Landreger, anebour da gement brezhoneg n'eo kat brezhoneg Kannadig Landreger, pa lenno frazenn vrudet Michotte gwisket kran en hor yezh : "merzh-out an devoud a vez bepred mui pe vui merzhout an devoudañ". Ar wech-se c'hoazh e pigno en e evalenn, nemet kaer en devo hejañ, na gouezho e liorzh va c'hensil aval ebet a gement a vije an "droidigezh" e brezhoneg Kannadig Landreger eus dezrevellad paotr Leuven... "Ouzh taol, tadig, klevet hoc'h eus ?"

.....

"Ne c'hellomp ket nac'h bep tra..." "Keit ha m'emañ ar Gall...."

An torr a zo aze bepred. Evel m'emañ e buhez pep Breizhad. Hor buhez torret dre an hanter. Poan hon eus en hor buhez evel m'o deus reoù all poan en o daouarn pe en o zreid. En noz a zeu e chomin betek div eur, betek teir eur, ouzh va zaol-labour o kribañ mennozioù brezhonek. An torr a chomo... "Petra eo ur broadelour ?" a c'houlenne O. an deiz all. An hini a ra e briziusañ tra eus an torr-se en e greiz; tamm ebet evel ar re a ra anezhañ ur gouli da bareañ, - endonañ a reont forzh penaos, na bareont ket, evel ma tiskouez N. Bothorel en e dezenn. Rak dioutañ e strinko tan an disubidigezh... gant na chomo ket da c'hortoz betek re avalkent !

o o o

ERWAN GWEGEN

DEVEZH AN HINI KOZH

Un devezh em buhez; netra all; ne fell dezhe nemet un devezh; evel pa'm bije, me, un devezh da reiñ, un devezh din. N'eus devezh ebet din bremañ nemet laeret e ve. Ret mont da glask e-touesk ar re dremenet, ar re gollet, ar re ankouaet; ha, c'hoazh, dibab, dilenn unan a dalvezfe ar boan, unan gwadek mar gellfen, diouzh ar c'hiz, pe unan klodus keta, e kreiz an aridennad diliv. Perak e ve moulet danevell un devezh, c'hoarvoud espar ebet ennañ ?...

Paotr e voutoù koad, pa'z i en kêr
Laka ober ur botoù lâer,
Rak ne glever...

d'ar bevar lamm ruz e tifarag-ocellan dre straed ar C'hastell. Montroulez en traoñ; moger dihegar an ospital en tu kleiz, diskiantezed o youc'hal a-drek, muezhioù du; en tu dehoù, a-grap ouzh talbenn an ti bihan gwenn un tangwall kabusined o flammañ. Hiron yen, glas-limestra an cabl, koabrennoù gwenn kann o redek el lijer, skañv an avel veurzh; arouez grizilh...

...ket er marc'had
gant an drouz deus da votoù koad !

Sklokal a reont, va botoù koad, war ziribin serzh an hent, ha sklokal em fenn poz ar ganaouenn. Ha dav dezhi, buan-oc'h atav, d'ar red war zinaou; kollet war va lerc'h tantad ar gabusined, tantad an heol warnon a gan....

Paotr e vragoù toull, pa'z i en kêr...

Ha neuze... Ma, kouezhet on; rannet va botez ha tapet ganen fest ar vazh.

Sed aze ar seurt danevell a hellfen displegañ. Piv a selaoufe ? Ha me tri-ugent vloaz ! Setu pezh a van em c'halon goude kement a zevezhioù hir ha leun ha goullou koulskoude. Tremenet o deus an eil war-lerc'h egile, ha, pa sellan ouzh va daouarn, diwar an holl valafennoù dezarvet ganto, diwar an aour tremenet etrezo, pegement a boultr alaouret pe lies-lividik zo manet ? Ret eo din klask, furchal gant ar vac'h evel ar pilhaouer en e veoliad lastez. Heugus eo.

Gwell kenderc'hel gant hiziv an deiz. Bremaik pa vezo deut paotr ar PTT e lennin al lizheroù. Atav an hevelep chaligoù dibouez, pezh a anver va labour : gouzout pegoulz e vezo degemer en zi da homañ pe honhont, deiziadif, eilgeriañ ur c'houlennadenn ditourif, diskriavañ d'ur c'hedskoazellerez e Paris pe e Bourdel, ha goude-se eveshaat formigell an dommerez, teuler ur sell war labour al loufrezed, ha mont ouzh taol gant va gwreg, ha prejañ en ur varvailhat war netraigoù, ha didaoliañ, ha mont d'un dro vale gant ar c'hi, hag en-dro d'ar gêr, diorbliñ ur rozenn bennak el liorz, ha gortoz em burev ar c'hlañvourezed da zont da gontañ din o sorbiennoù, ha divizout gant ar vezeganez, hag evañ ur banne te, hag emguzuliañ gant ar c'hegner, hag azezañ adarre em burev, ha sevel kontoù, gwiriañ sammad sammadoù, prederiañ, distrihañ tuennoù an emgav da c'houzout ha keroc'h e vezo ar c'hig pe ar pesked arc'hoazh, diavelout urzhierzh al labour er sizhun a zeu, ha mont ouzh taol gant va gwreg, ha divizout ganti evel pa zivizfen ganen va-unan, hag enaouif ar pellwelerez, ha reizhañ dibunad an delvoù war ar skramm, ha displeviñ-gen dirazo, ha goude-se lazhañ, lazhañ ar gouloù, lazhañ an tan, lazhañ zoken an elienennig fent o tarvevañ em c'haouded, lazhañ va buhez, ha marv, 'benn ar fin, an deiz, hiziv, dilun. Ha warc'hoazh, lazhañ dimeurzh, ha goude-se lazhañ dimeurc'her, ha diziv, ha digwener, ha disadorn, ha disul, hag adarre, dilun, dimeurzh... betek hini ar varn.

Nemet, nann, ne vezo ket hiziv evel dec'h. Hiziv e teu

va mibion, va re din, kalon va c'halon ha kig va c'hig. Amañ e vezint ouzh taol ganeomp, ar mezeg gant e wreg, an ijinour gant e hini hag e verc'hig koant, hag hennezh all, loen didalvez, ar studier war bep tra gant e gorn-butun, e sell farsar hag e brezeg goupañs; o zri; va ziegezh; hag o mamm, va c'haredig a wezhall, kenlodek e kement ha kement bloavezhioù a drevell; roufennet eo un draig he zal bremañ ha krizet korn he lagad pa c'hoarzh; ha pa sell ouzhin e lugern diwarni al lealded, ar fizianis, ar vadelezh a zo bet dezhi a-viskoazh.

Aze emaint : "Hela, Ifig," eme Joel an ijinour, o tont davedon, e zaouarn astennet dirzañ, "penaos emañ ar bed ?" Hag ur palfad war va skoaz ha va dorn en e zorn kigennek tomm; ur mell den drev ha safarek n eo ket chalet gant an ardou.

"Ifig" a c'halv e dad, ha taran e c'hoarzh a dregern.

"Demat dit, va zad", eme Yann ar mezeg. Dont a ra davedon war e c'horregezh, pokat din en daou du, hegarat, e zaouarn gwenn war va diskoaz. Sioul, habask, eo; bamus, eme e wreg pegen parfet e komz ouzh an dud an diaoul-se pa ne vez ket er gêr; ur roched gwenn gantañ, atav gant ur frondenn skoulmet kaer. Daoust d'ar fulennig garantezus a luc'h en e lagad, sell evezhidik ar mezeg eo a bar warnon; daoust din bout an tad, bihan a ya va c'halon bep tro, betegout e tegouezfe dezhañ gwelout ennon arouez ur c'hlañved anchal. Piv 'our ? Stumm den eus an dibab zo gantañ; gouizieik eo ha berzh bras a ra; morse ne vez klevet o vrabañsal pe o seniñ kleier war anv e genseurted. Karet eo. E wreg ivez zo karet; ur vesegez, ha warni doare ul labaskenn dev ha rust; ur gazugelez lart ha blot, neuz ur geginerez voemet, nemet tan ar c'hefreder o lugerniñ en he lagad. Tuet eo war al lennegezh; bamiñ a ra da Claude ha Prevent, ha tabutoù dizivezh a savan outi o prizañ Nerval mui eget Supervielle pe Soupault mui eget Valery. "C'hwil, va zad," emezi, "n'eus ket tu da vreutaat parfet ganeoc'h; atav o farsal pe o tiac'hinañ. N'eo'h ket sirivus, c'hwil". Sirivus avat ez eo hi; farserezh ha godiserezh zo mat, gant ma chomint en o c'hornig; ne c'hoarzh 'met ouzh fentigelloù gnaouet mat. A-wezhioù ni, hon pover, tad ha mibion, e stagomp d'he heskinañ. War zivout Claude, lakomp. Parfet. Sirivus. Kefredourion kement ha ma c'hellomp : "Hor barzh nemetañ... An hini a astenn e skeud war dzont ar varzhoniezh a-vremañ... ar gull meur... Kaour ar votez satin..." Ha dav dezhi. Ne vez ket pell e verzh ar flemm : "C'hwil, 'vat, c'hwil ar Gwenoù, ha petra a gav deoc'h ez oc'h ? C'hwil, gen-

aouien evel ar re all, c'hwi c'hwi..." ha da vreskenn, Ha fuloret pa zic'hargadenomp da c'hoarzhin. Ruz. Dedostaat a ra, pokat din karadec, ha pellaat buan; un draig distizius : aon da vout tapet, ne oar dare penaos na gant petra; diaes hec'h en em gav gant ar Gwengenou bodet en-dro dezhi; mont a ra da gaout va gwreg; hommez ur Gwegen n'eo ket penn-da-benn; truezus e c'hell bezañ, ma n'eo ket kontammet holl c'hoazh he c'halon estren. Vad a ra : div emaint ouzh ar meuriad.

Teir. Alet, mamm Alet vihan, gwreg Joel vras, a zeu din. Ur plac'h yaouank kozh, kuezhet dre e vadelezh dezhañ etre divrec'h va lampon. Treut; meleganez; ha ganti ur gwenc'hoarzh izil, splann koulskoude, goulaouet holl gant an anaoudegezh vat. Boz eo gante o daou ha boz eo ganen ouzh o gwelout o c'hoari gant Alet vihanañ, o merc'hig. A-c'haoliad war va choug emañ homañ, skoulmet he divrec'higou en-dro d'am zal; o krenañ, o c'hoarzhin, o youc'hal, o tridal gant al levonez ha gant an aon da gouezhañ.

Chomet eo Tual a-drek ar re all. Brasoc'h eo c'hoazh, ar c'hi treut anezhañ. Gant e c'hwec'h troatad e c'horren e gorn-butun a-us da bennoù ar re all : "Del, va zad, emezañ, bep tro ma teuan d'ho kwelout ho kavan tekoc'h ha cheuc'h; paneve ar vlevenn-se a zo kuezhet deoc'h... Mistr kenañ e oa war ho tal." Ar c'hanfard lous anezhañ ! N'eo ket me a c'hellfe mont tarvoal hep gouzout da zen gant an hailhon flatrer-se. Hag an holl da sklokal. Hag heñ, padal, ken parfet ha plarik. Piv a gredre lavarout emañ oc'h ober goap ? hag ouzh e dad gwashañ zo ! Al lampon ker !

Ha bremañ davit ar pred. Ez lidek : va gwreg ha me da heul ar pemp pe c'hwec'h all o ragachat hag o sklankal, ar verc'hig vihan o trabidellat, he dorn e dorn he mamm, hag homañ a-ispilh ouzh brec'h he farlaod a zen; Yann o kuzulikat e skouarn e lardonenn; ha va hini din o stardañ goustad va dorn gant al levonez o tic'hlanañ diouti.

Ouzh taol emaint bremañ. Bravat taoliad ! Komz a reont sioul, disafar. Morse ne grogont er plad hep goulenn aotre ha kinnig a reont d'ho mamm ha d'ar merc'hed aradec dezhe. Pa ziskargont gwia, o gwerenn ne vez nemet hanter leuniet...

Youc'hadennou skiltr : "Forzh va buhez !" ... N'am lazhe ket, Lom, n'am lazhe ket, va Doue..." Mouezh ur vaouez e deun an oadoù pell. Skrijidik ha skrignus, dent an heskenn o reglñ an tav. Ha goude-se mouezh kurun ar gwaz : "Me zesko dit, loen hudur, me zesko dit, gagn lous..." Ha ni er-maez, mamm-gozh ha me, hon daou, d'ar red etrezek ar pont, a-hed ar rinier.

"Lom hag e wreg adarre, e tispleg din. N'az pezh ket aon". Aze eo; un toullad tud digomz o tillaogañ en traoñ, en o regenn war ribl an dour. Bras ar gwaz, sonn, bigennek ha du; difiñv, hag e vouezh o krozal : "Ha dont a ri alese, gast ?" Bugel bihan etre bloe'hoù tuzum breziou ar merc'hed, e sellan: en dour bas e kreiz ar sterig boull emañ ur vaouez, kozhig, heñvel ouzh va mamm-gozh, heñvel, nemet gant he blev a-fuilh hag he neuz. Krabiset holl he dremm, gwad o tiverañ diouzh hec'h elgez, gleb dour-teil he c'horfenn hag he broz. Kuezhet en dour moarvat. "Aze 'maoc'h, Adela, eme Anettig an Azou, hon amezegez. Sellit 'ta Scazh baour. Lom bras n'eo ket bet evit padout en dro-mañ. Ken fuloret e oa m'en deus talet anezhi er rinier a-dreist an drez. Ma n'eo ket ur vezh ivez en em vezviñ evel a ra. Hag ur vaouez c'hoazh ! Un deiz bennak e c'hoarvezo droug".... Dilavar e chomont bremañ. O sell a bouez warni, liskidik gant ar c'hoant argantvout. An neñv digas ha skañv; ar regennad publi oc'h arvestiñ, hag en dour o saflikat an heol o strinkellikat. A-benn an diwezhe e krogas da vale; ruzañ a reas he gweledenn war c'horre an dour; tostaat a reas d'ar ribl ha krapat gant ar c'hleuz. Dorn ebet na savas d'he harpañ; en ur horellat e tremenas etrezomp, e-biou din; warn-on e paras he sell, ur sell glas-neñv, diantek ha glein, emañ glac'har ha spont dizamant; hag heñvel, ken heñvel, ouzh va mamm-gozh. Riv an oa. Den n'en devoa komzet eviti.

.....Morc'hed ebet gant va re-me; c'hoarzhin a reont. Morse n'eo deus bet da welout seurt arvestoù; desavet int bet en ur c'horn a Vro-c'hall kalz dereatoc'h kouerion emañ, tud, pa lavaran deoc'h, hag a oar penaos evañ kuit a vont meyv. Biskoazh n'em eus kontet dezhe. Goap a rajent marteze. Ha petra raje dezhe morc'hed ha mezh ankouezet pell zo ur paotrig dek vloaz ? Aze emaint, o c'hof ouzh un daol gourv-ezet mat, en ur sal-debriñ goulaouet brav ha tomm, gant ur vatezh oc'h ober war o zro. Nag an naon, nag an dienez, nag an azpec'h, nag ar vezh ruz, ne c'houzont ket mat petra eo. Seven, hegarat eo ar bed en-dro dezhe, kempouezet mat o ezh-ommoù, ha moustret war o zec'higoù fall. Peun a gav dir ez int. Ha koulskoude....

Daoust hag o anavezant ? Ya, gouzout a ran petra int bet, petra o deus graet. O buhezigoù bugel, o bloavezhioù skol, o zaolioù kaer a ganfarded, o c'harantezioù; o falioù eeun, ya, o anavezout a ran. He 'oar e labour Joel da bremañ ur c'harr-

tan nevez, me oar emañ Yann o termal da c'houzout hag as-
antiñ a raje d'ur gevrat gant ar C'hedskor, me oar emañ
Tual o klask an tu da vont d'ober un dro e Bro-C'hres, me
oar Nann, n'o anavezan ket. An deun, an digarez da
vevañ o deus kuzhet ouzhin; n'ouzon ket perak ez int bev,
va re din; n'ouzon ket diwar pe zezo e vez renet ganto gwer-
ed an nerzhoù dispar a verzhañ ken mat enno; n'on ket evit
bamiñ outo hep betegwelout, n'on ket ganto.

N'on ket ganto, ha n'int ket ganen. Ar c'hleizhennoù
leskidik em c'halon hini anezhe n'en deus pledet ganto.
Albac'henoù o zad a lavaront, habask, ret eo bout doujus
ha selaou outañ; dav eo d'an unan c'hoari gant un dra bennak
gant ma ne ra droug da zen. Ha mousc'hoarzhin a reont kar-
adek ha karantidik o soñjal em sorbiennoù. Hag an daou ugent
vloaziad-se ma'm eus pledet ganto, o klask ober anezhe tud,
daoust ha kollet int bet ? Piv a gredfe hen lavarout ?
Evidon avat, kollet int; kollet int peogwir, amañ, e kreiz
va re, n'eus ket unan eus ar re-se na vefen gouest da zi-
lezel hep keuz. "Ifig, eme Joel, kemer ar berenn-mañ 'ta,
kalz darevoc'h eo"...

....N'on ket diwezhat, aze 'maint; petra reont dirak
an nor en tu all d'an hent ? Tosteat a ran. Pet 'z eus
anezhe ? Feat, Krcinich, Madeg, Korvez, an Arc'hanteg, al
Boarer, Bizien; aze 'maint va c'henseurted, va c'henskol-
idi; youc'hal a reont ha kanañ ur ganaouenn kanfard.

Paotrigo kozh an dafisoù
Kac'het 'n e valafisoù...

O brec'hioù a sav hag o daouarn
a stlap; n'eo ket mein koulskoude; en o sac'h skoliad eo
e kemeront pezh a zarc'havont; o bara an hini eo, hag o
stlepel a reont gant daou baour kaezh, o daou dirak ar rib-
itailh hailhoned. Louet, barvek, diskabell, gant o visac'h
a-dreuz-skoaz, e stouont, e kluchont, da zastum ar grizilh
bara a gouezh warno; redek a reont war o barlochoù evel
chas etrezek o skudellad boued. Aligentañ, paotr ! Ha va
c'heneiled da c'hoarzhin, hag an tannoù bara da nijal; ha
pa savont diwar al leur dic'hoarzhin a reont ouzhimp, an
daou paour kaezh; gwenn e skrign o dent e-kreiz o bary louet.
A daol trumm tint ar c'hloc'h : eizh eur; dav mont tre er
skol. Ar vandenn a-bezh a fuilh afo. Nemedon. Konoc'her atav
e choman a-drek, un dra bennak dispis o terc'hel warnon.

Echu eo ganto dastum ar bara; en o sav emaint, o daou. Ha
me neuze kemeront em sac'h va zamm bara hag e stlepel ganto.
Tekañ a ris unan anezhe e-kreiz e vruched, hag e puchas da
zastum anezhañ. Ha neuze sevel en o sav sonn ha sellout ouzhin
gant e zaoulagad glas ha distagañ a vouezh gorrek ha kreñv :
"Doue d'az paeo"...

Amjestr evel ma oa n'eo ket paeet c'hoazh nag an aluzon
divalav nag an drougiezh pilpous, nag an diantegezh noazh,
nag ar vezh. Echu avat eo an devezh; arc'hoazh e vezo unan
all.

o o o

YOUENN OLIER

DISADORN 29 A VIZ MAE 1943

Resev a ran SAV. N'eus ket kalz a dra ennañ : arabat d'an dud ouiziak disprizout ar re zizesk. Peur e paouezo ar skrivagnerion a brezeg evito o-unan ? Arabat dismegañsñ yezh ar bobl hag hi treuzwisket gant gerioù gallek...

Gwelet em eus ivez en niverenn-mañ ur studiadern diwar-benn anvioù-lec'hioù savet gant Jausset.

E-kefver ar pennad gallek diboañ diwar-benn an doare-skrivañ bet skrivet gant Taldir hag an boa lennet d'ar mintin em boa bet tro da gomz gant Jausset.

Lavarout a reas din n'en doa ket pleustret war ar yezh abaoe pell 'zo hag en doa dangollet ar pleg da gomz. Duzhpenn-se e oa micherour ha n'en doa ket amzer. Galleg poblek e zeus gantañ; e vrezhoneg avat a oa dereat. N'en doa ket roet e labour diwar-benn an anvioù-lec'hioù da Roparz Hemon peogwir n'en doa ket kalon da reizhañ an doare-skrivañ.

Da greisteiz ez on aet er-maez. Kejet em eus gant S., an dimezell M.; c'hoar S. a oa ouzh e ambroug; o amhañsñ a ris. Ha setu J. o tegouezhout gan-eomp e traon straed ar Bastard. Kontañ a ra din n'eo ket Quenette kement a-anep d'ar Vrezhoneg ha ma soñjer. Kuitaat a reomp J. danc'houde. Kenderc'hel a ris da zivizout gant S. Keleier : A.G. a oa dimezet a-benn bremañ. Goulennet en doa ar C'homite perak e oa bet digresket lodenn-vara ar Vretoned. Ar Frefed n'en doa ket prizet respont ; broezeñ en doa graet zoken dra ma n'o doa ket izili ar C'homite a-walc'h a fiziañs ennañ. Diwezhatoc'h e komzas S. eus ar

youenn olier

skingomz. A-benn ar c'hentañ a viz Mezheven e vo ur brezegenn bemdez. "Bez e c'helli skrivañ unan pa blijo dit", emezañ. Bremañ ez eus gwir da gomz eus politikerezh. En devezh all e oa bet distaget ur brezegenn diwar-benn ar broioù keltiek, ha peurgetket diwar-benn Breizh. "Tud a oa bet taolet en toull dre ma karent re o bro, reoù all a oa bet barnet d'ar marv." Hag e oa bet lavaret en dibenn : "Brezhoneg, an em savit a-enep d'an estren ho kwask. Kasit kuit an estrenion er-maez diouzh Breizh."

Muioc'h-mui e oa tregaset ar gouarnamant gall gant nerzh arsokaat an Emsav e Breizh. Drouksantout a raed e oad o vont da aozañ ur gwall daol bennak a-enep d'an emsaverion. Pennoù an emsav marteze a vije taolet en toull-bac'h. Marteze e c'houlennfe ar C'hallaoued digant an Alamaned o lezel da ober pezh a garent e Breizh evel priz o c'henlabour.....

Mont a rejomp da gavout L. Pennadoù en doa S. da zegas dezhañ evit ar B. O roet en doa din da lenn a-greiz m'edomp o vale a-hed ar straed ar Bastard. An danvez anezho a oa un degouzhadenn iskis ha fentus a oa c'hoarvezet e-kerzh bodadennoù ar Framm. Un dan kozh, un noblañs bennak, n'ouzon dare e anv, a oa un tammig pounnereglev en doa kredet klevout e oa bet anvet Taldir d'ur garg uhel er Framm. Hag eñ d'ar red betek an ti-post da gemenn an dra-se da Daldir dre ur belleskridenn (sousezhus a-walc'h an istor-se : diriaou mintin em eus gwelet Taldir e Roazhon). Diwar an darvoudig-se en doa savet S. ur gotadennig plijus a-walc'h. N'eoñ doa lakaet anv ebet eveljust ha roet en doa ouzhpenn-se stumm ar gwenedeg d'e yezh a-benn kas an diskred diwar e dro.

Seniñ a rejomp e toull-dor L. Ur peotrig seizh vloaz bennak a zeuas da zigeriñ deomp. Gouzout a raed brezhoneg moarvat rak respont a reas deomp er yezh-se.

Lakaet e voemp da zont tre e sal-labour L. Taolennoù a oa istribilhet e pep lec'h ouz ar voger. Souezhet on peurliesañ gant ar stumm anezho, livek, reas ha linennek war un dro.

Guan a-walc'h e teuas ar gaoz war gudennoù ar brezhoneg ha peurgetket diwar-benn niverenn diwezhañ SAV. Houmañ a zo bet savet evit stoum ouz Roparz Hemon, eme L. Edo o paouez skrivañ da Z. Evit diskleriañ dezhañ peneas ne oa ar rezhskrivadur peurunvan nemet un diskoulm politikel, evel m'eo anat. N'eo ket fall evit se; evidon e kavan rezh an diskoulm-se; ur yezh a zo da gentañ ur benveg darempredoù a servij deomp da zisplegañ hor mennozioù en ur gevredigezh unvan - evel ur moneiz ez eo.

Anv a voe da c'houde eus P.R. kelennere keltieg er skolveur. Hervez doare, diskredik a-walc'h eo war amzer-da-zont ar brezhoneg, evitañ da vezañ kelennere war ar yezhoù keltiek. Un arvarour e vefe, gouez da S.

L. a gomzas deomp eus e romant da zont. Dindan ar wesk e oa. E-giz romantoù Wells e vefe, faltaziek hag arouezenus war un dro. Ret e vo jubannañ anezhañ evit dizolsiñ an dalvoudegezh anezhañ.

Diwezhat a-walc'h e oa pa gimiadjomp diouzh L.

Tre ma oamp o tont d'an traon e lavaras din S. e oa L. unan eus ar re a blije dezhañ ar muiañ dre ma oa diloro'h he diaro. N'oa ket anezhañ ur fogaser evel ma'z eo tachet da vezañ darn eus ar skrivagnerion.

Araok kimidiñ e tivizjomp en em gavout er gêr da c'hwec'h eur. A-hend-all n'em boa netra ispisial da ober.

Chom a ris er gêr goude mezenn. Gellat em befe mont da reiñ ur gentel brevez war ar maez e Sant-Jermain hogen n'em boa c'hoant ebet da vont en hent. Fellout a raed din mont da arvestiñ ouz ur pezh-c'hoari klasel er c'hoariva da noz. A-hend-all e oa dav din studiañ istor Breizh e sell da lodenn dre gomz an "Diplôme d'Études supérieures celtiques" ar Skol-veur. Dez e c'hellen ivez bezañ degemeradus e studioù gresianek, ha dav e oa din labourat diastal a wal d'al lodenn dre gomz. Evit istor Breizh ne oa ket ken mallus. Porzhier ar Skol-veur an devoa lavaret din ne vije distro Pocquet a-barzh ar sizhun war-lec'h. Un den sporedek e oa ar porzhier-se : ret e vefe reiñ un dalvoudegezh praktel bennak d'an arnodennoù keltiek, emezañ, pa chom hep kaout tamm ebet.

War-dro teir eur edon em c'hambro o studiañ, hantar gouzizet stign ar prenestr en abeg da wrez an heol, pa zegouezhas B. du-mañ. C'hoant en doa kaout niverenn diwezhañ Walarn evit lenn ur pennad embannet enni gant an Henañ. E aliañ a ris da vont da gavout Berthou. A-hend-all, pezh a skrapas da gas gentañ ne voe nemet "Le Démon de midi" gant Paul Bourget en doa kavet war va astallob.

Hervezañ ne oa ket gwir e oa P. ar C'h. e sefj mont da valeg. Dezravell a reas din pezh a oa c'hoarvezet da gefner goual en Estourbeillon e c'hoariva kêr. Unan eus ar warded o doa skoet war Gostlogon en doa graet anezhañ "Sale boche". An Alamaned o doa gouezet kement-se, hervez, ha gant piv e oa bet distaget ar c'homzoù amzara-se. Anozet e oant eveljust. Peotred Vichy, na petra 'ta, o doa klasket tennañ ar gward-se a dre krabanoù an Alamaned. Lavarout a rejont ne oa ket ar gward diouzh servij en devezh-se. Diskouezet e voe ar c'hontrol. Droug a yeas en Alamaned; ar Prefed a glevas komzoù trenk ganto; d'en em zigareziñ e arguas e oa ar c'honiser kreiz kiriek eus ar polis. Hemañ d'e dro a lakaas ar samm war ar Prefed. A-benn ar fin e voe kastizet ar gward hag echuiñ a reas an afer evel-se.

Ne grede ket B. e kredefe gouarnamant Vichy aozañ ur gwall daol bennak a-enep d'ar vrogaourion. N'oa ket ali tamm ebet gant S. war ar poent-se.

Ambroug a ris B. betek an Tabor. War an hent e tisklerias din en doa desket un dra da vihanañ pa oa en toull warlene : n'eo ket an toull-bac'h evit

kemm menozioù an dud a stourm evit un uhelvennad. N'en em zisammzer ket diouzh un enebour o toullbac'hañ anezhañ.

Goude bezañ e gitaat e kejis gant L.R. a oa azezet e gwasked ar sedrez-enn vras hag ef o studiañ ar skrivagnerion c'hresianek e sell da lodenn dre gomz en eotregezh. Ur pennad marvailh a ris gantañ arak dont en-dro d'ar gêr.

Erru en ti e stagis da lenn istor Breizh ha da skrivañ. D'ur poent bennak, soñj mat am eus, e savis diwar va c'hador evit mont da welout pet eur e oa : pemp eur a verke an horolaj. Souezhet e voen e vije ken diwezhat hogen ne daolis ket nemeur a blad hag e adstagis da labourat hep ober muioc'h a van. Evel ma veizis a c'houdevezh e oa an horolaj un eur en arak. E tro dek munud war-lerc'h e klevis a-greiz-holl ur fraoñverezh uhel en oabl, fraoñverezh anavezet kirri-nij an eizh a viz Meurzh arak. Kerkent e voudas ar c'horn-evezh; war un dro e klevis tarzhadennoù damvouget, mesket an eil gant eben. Ne ouien dare a pelec'h e oa tremenet ar gentañ gwagennad; an eil gwagennad avat, a dremenas, a gave din, a-us d'an ti; rektal war-lerc'h e kredis klevout an tarzhadennoù o tont eus kostez ar Mailh pe ar ganol; daskrenañ a rae ar prenestr a oa digor d'ar poent-se.

Mont a ris betek ar pondalez ha gervel L.R. N'edo ket er gêr. Diskenn a ris betek dor ar c'hav : houmañ a oa morailhet. D'ar c'houlz-se e tremenas un drede gwagennad, hauliet gant tarzhadennoù.

Pa voe anat din e oa echu ar vombezadeg ez is er-maez da welout petra oa c'hoarvezet. Tud a oa e toull ar prenestr; o goulennata a ris hogen, evel dres, ne ouient ket muioc'h egedon. Dont a ris er-maez eus ar porzh war ar straed : eno e oa un talpedig tud. Diskouez a rejont din ur goumoulenig wenn a sablante sevel a-us d'ar Prefedti : heizevo e oa bet taolet bombezennoù war-dro an ti-hent-houarn - pezh na oa ket gwir - hag e tro ar Mailh.

Kejout a ris gant ur c'hanskoliad kozh. Ne ouie netra Kennebeut. D'ar mare-se e tegouezhas va c'hoar C. ha dont a ris endro d'ar gêr ganti. A-hend-all ne oa ket echu an evezh. An dimezell J. a erruas etretant. Va c'hoar a gontas neuze pezh he doa gwelet. Edo a penn ar straed Sant-Melani pa oa deraouet an evezh. N'he doa ket graet nemeur a van da gentañ rak kavout a rae dezhi ne na nemet obuzioù an difenn enep-kirri-nij a oa o tarzhañ. Goude ar gentañ gwagennad e fellas dezhi mont en hent adarre. Kerzhout a reas betek plasenn al Lisoù. Eno e adkrogas kanolioù an difenn-enep-kirri-nij da harzhal. Ur peotr-amzifenn a gemennas groñs dezhi mont da waskediañ UN TU BENNAK. C. a yeas tre neuze er c'hentañ ti a gavas digor.

Dame'houde a voe lavaret dezhi e oa bet taolet bombezennoù e traon leurgêr al Lisoù. Eno avat e labour M. H. Kerkent ha ma c'hellas e redas betek eno da welout petra oa c'hoarvezet. Hogen ar c'h"Corporation paysanne"

a oa an holl yac'h ha salv. Kentizh ha m'an doa boudet ar c'horn-evezh e oa aet an holl d'ar c'haloup da repuñ er c'hav hogen ne oa c'hoarvezet droug ebet gant hini.

Gouzout a reas avat o doa graet ar c'hirri-nij o reuz un tamm izeloc'h, straed Naonedat; gwelout a reas o tegouezhout kirri-tan ar c'hlañvdiou hag ar vedisined, ur paour kaezh den drailhet an hanter eus e zrem ha leun-wad degaset en-dro d'e di.

Evel an dud all e tamalle gerv a-walc'h ar Saozon-Amerikaned.

Diskenn a ris d'am zro war-du plasenn al Lisoù hag ar ganol. O tiraer ar blasenn e klevis bommoù un diviz o tont eus ur stal : ur vaouez taeret o kunujañ an Amerikaned, unan all o klask o difenn ken feuls all. Setu a-hend-all an digereziou a zo bet ijinet ebaoc : fellout a rae d'ar Saozon-Amerikaned tizhout ar c'hoc'hu e-lec'h e oa berniet, a-harvez, a bep seurt gwikefreoù a dalveze da verdeadurezh-vrezel an Alamaned.

E penn ar straed Naonedat e spurmantis ur bern tud tolpet. Daou c'hozh ti - ostalerioù war e ouezis diwezhatoc'h - a oa bet flastret mik dindan ar bombezennoù : na chome ken nemet ur wrac'hallad plenkach disneuz holl ha gwann, sklentennoù, plastraj, tammoù moger kaj-mesk, arrebeuri diampret holl. Hag ivez tokarnoù gwenn, tokarnoù du, paotred yacuank o tiatredañ, e-mesk an uloc'h loust, ken ambouabal avat.

Ur pennad amzer e chomis da arvestiñ. Iskis panaos oa heñval an holl diez dismantret. Eveljust ne c'halled ket denesaat ouzh an tiez-se. Stanket e oa an hent ouzh an dud gant ar bolised.

Dont a ris dre ur venell betek kaoù ar ganol. Kentañ tra a walis eno a voe un toull kleuzet dres war ribl ar ganol. Leuniet e oa gant dour lor ar ganol ha flaez al lec'hid a save diboutañ. Tud a oa eno; klask a ris toullañ kaoz ganto. Diwar-benn palioù ar vombezadeg e choment mat avat.

Hauliañ a ris ar ganol bet k pont straed Vrast. Dres e-tal ar pont-se e oa ur mall toull all graet gant ur vombezenn : c'hwec'h an azhenn-lekif a oa strewet tro-dro. Ar c'hozh savadur e-keñvar a oa bet dibrenestret holl ha goumeriet an talbenn anezhañ gant tarzhadoù ar vombezenn, emichañs.

Distreiñ a ris war-du porzh an tram. Ur bern tud a oa bodet eno, war ar riblennoù straed, dindan rakdoenn ar porzh-houarn. Gwelout a c'hallis a dostoc'h an tiez dismantret. Unan anezho a oa bet pourzistrujet. Testaat a ris betek toull ar straed a oa berzet atav gant ar bolised. An dud en em waske eno ivez hag e sallent hep rannañ grik ouzh an distruj.

Grizias e oa an heol avat ha groñnet e oomp gant ar boultrenn wenn o tont eus an atredoù. Klask a ris goudor an-dro dindan rakdoenn ar porzh-houarn. Eno e savis marvailh gant daou zen da c'houzout petra oa c'hoarvezet. Setu. Ur c'hafedi a oa bet friket dindan ur vombezenn; leun kouch e oa gant beajourien o c'hortoz tren Mordel. Int o-unan a zlee distreiñ d'ar c'hafedi-se dak

munud war-lerc'h hag edont o paouez dont er-maez anezhañ pa oa kroget ar vombezadeg. Da c'houde o c'hlevs o kuzulikat etrezo da c'houzout penaos en em gemer evit kemenn d'ur vaouez a anavezant e oa bet lazhet he gwaz. Na felle ket dezho her c'hemenn diouzhtu. Ur c'hamelad dezho hag a oa chomet er c'hafedi e-lec'h dont ganto an hini e oa.

D'ar c'houlz-se e tegouezhas an Alamaned gant o binvioù, kirri-samm, h.a.

Ne chomis ket pelloc'h eno. Diaezet a oan gant ar waskadeg e-kreiz an uloc'h, e gor an heol. Skeiñ a ris war-du leurgêr Vreizh. Aon am boa bet d'ur mare e vije bet tizhet ar savadur ma chome T. ennañ. Ne welis ti distrujet ebet eno avat; bombezennoù a oa kouezhet nepell alese koulskoude; e pep lec'h e oa torret gwezennoù ar preñester, dreist-holl re ur mell stal genwerzh; micherourion a oa o tachañ plenk evit stankañ an digor d'an ti. An holl dud a oa e toull o dor hag e sellent war-du straed ar Chalotais e-lec'h e oa kouezhet bombezennoù, war ar straed, a gredan. Tud a oa bet lazhet, pe gant ar c'hwzhadenn, pe gant ar pavez a oa bet bannet tro-dro. Ned is ket da walout.

Poent e oa din distreiñ d'ar gêr. Treuziñ a ris ar pont war va c'hiz en-dro. Stankoc'h e oa an engroez en-dro d'ar straed Naonedat. Ne c'halled ken dedostaat avat, zoken en tu all d'ar C'halvar. Alamaned eo a rae ar servij-urzh en dro-mañ, pezh a oa diuas a-walc'h dezho peogwir ne ouient ket yezh an dud. Ne cant ket strizh tre ha lezel a raent aes a-walc'h an dud da dremen.

Pignet a ris neuze war-du ti ar B. Un tammig araok erruout e skoaz d'an iliz-veur e kejis gant L. Kaozeal a rejomp ur pennad diwar-benn ar vombezadeg. E wreg a oa bet darbet dezhi bezañ lazhet, emezañ. Ur vaouez c'hlozet lionet holl he fenn, a yeas e-biou deomp. Ur patrom a rofe a-walc'h da unan eus e daolenoù, a lavaras.

Er gêr e kavis an dimezell J., hor perc'hennet, mantret holl. Kollet he doa ur geneilez dezhi friket dindan dismantrou he zi, gwreg ur prokolor eus al lezarn. War-dro ar c'hlañvdi Santez-Anna edo o chom hounnezh hag he matezh a oa bet lazhet war un dro ganti, a gredan. Eveljust ne wela ket mat pezh a oa ar vombezexion o klask er c'harter-se.

S. en em gavas du-mañ diouzhtu war-lerc'h. D'an eur e oa. Mont a rejomp a-gevret d'ar Skol-veur. D'ar mare-se e tleas bezañ embannet roll an degemeridi en arnodenn dre skrid. Eveljust e ouien e oan bet rasket. Hogen bez e felle din gouzout hag-ef e oa bet degemeret M.V. : gouzout a raen n'he doa tremenet nemet gresianeg. Kalz a studierion a oa deuet da salo. An aparitour a stegas da zibunañ anvioù er re o doa graet berzh. War a seblant, kalz o deus c'hwitet e gresianeg hag e latin. Ne glevs ket anv M.V. S. en devoe muioc'h a c'hañs. : e gamalad P. eus Goulien a oa bet degemeret.

Pa vos echu gant an aparitour dibunañ e roll ez ejomp kuit. Ne gomzis

gant nikun nemet gant R. a saludas ac'hanon, lirezhin : degemeret e oa bet en arnodenn. Ober a reas gouic'hemennoù din evit bezañ bet degemeret en "Diplôme d'Etudes supérieures cultiques" mat kavout a rae gwel, emezañ, bezañ graet berzh e gresianeg hag e latin. Ur c'henliusead kozh da S. e oa. Ober a rae goap ouzh an emtrenerion, emezañ.

Merzout a rejomp ar Gall kenlabourer dindan ar porched. Hogen ne felle ket da S. mont kuit diouzhtu. Mennout a rae ober gouic'hemennoù d'ur plac'h a bleustre war ar saozneg hag a oa bet degemeret. Dozaevell a reas din penaos en doa kemeret ar pleg da gomz ganti e brezhoneg. Dozaevell a reas din penaos anaoudegezh ganti. Dre zegouezh he doa anzavet e ouie brezhoneg. Ha S. neuze ha mont outi e brezhoneg. Diegi he doa da gomz da gentañ. Hogen e-benn bremañ ez eo boazet. E gwirionez e komzas ouzhip e brezhoneg; aes e oa da intent daoust ma ne ouie ket ar yezh lennegel.

Goude-se a tiskennjomp etrezek an ti-post. Bez o felle da S. kas ur pellskriz da B. da gemenn dezhañ en doa graet berzh en e arnodenn. Sal an ti-post avat a oa leun chouk gant an dud a felle dezho diankreziñ o c'herant o kemenn dezho ne cant ket bet lazhet ar vombezadeg. Ne oa tu da bodout eno gant ar broutac'h. S. eta ne gas ket da benn e vennañ pa wela an engroezid a dud en em waske dirak an drafen.

Mont a rejomp er-maez. Ha ni da gajout gant ur Breizhad anavezet gant S., na ouie ket brezhoneg avat. Divizout a rejomp diwar-benn ar vombezadeg. En diwezh piv a zeuas d'hon diambroug o tifourkañ a ziadrefiv pileroù pratell an ti-post nemet L.R. e-unan, drant an tamm anezhañ rak berzh en doa graet e yezhoniezh hag e gresianeg. Goude bezañ graet ur pennad marvailh ez-ejomp da evañ ur banna sistr en un ostaleri, war-dro an "Ouest-Eclair" o lezel ar paotr all war hol lerc'h; fiziet e oa bet ennañ ur marc'h-houarn da ziwall. En hor c'hichen e oa un den mezh oc'h orogallat e-unan. S. a nac'has komz galleg outañ. Hag agile da lavarout douisk hag uvel : "Ne 'zo ur gall, aotrou. Ret eo komz galleg ouzhin."

Goude dilec'hiañ diouz an davarn a pignomp etrezek an ti-kêr. Straed Estrez e kejjomp gant ur brogarour yaouank, un duard, studier war ar wirnouriezh, e-giz ma lavare. Bet e oa e karterioù an Hanternoz da vara ar vombezadeg. Traoù ouzhus en doa gwelst eno : tri drailhat ha flastret, diaz peurzismantret. En em gavout a rae eno gant B., ur c'hanstudier deomp, ur beleg : hannezh e oa chomet pell o kofar an dud war o zremervan, emezañ. Un absolvenn evit an holl en doa roet da gentañ o tegouezhout.

Ar paotr e oa ganeomp e oa un Tregeriad. Komz a rae brezhoneg mat tre, hogos lennegel, daoust ma n'an doa ket studlet anezhañ kalz. Botek seizh vloaz n'an doa komzet nemet brezhoneg. Rak-se ivez e oa ken flour o yezh.

Ne gaze ket kalz ar saozon-Amerikaned, dreist-holl an dozaevell-se, war-

lorc'h ar vombezadeg. En em c'houlenn a rae petra a zoufe an omsav da vazañ war-lorc'h ar brezel.

Neuze a tistrois d'ar gêr. Du-mañ avat ne oa den ebet, ha rankout a ris gortoz ugent munud arak ma erruas N. ha war he lorc'h M.H. ha C. Dalc'hamat edod o tivanerif, emezo, ha kavout a raed bepred korfoù marv nevez. E-doug koan e voe anv strazomp eus ar riskloù a oa o chom o kêr hiviziken rak diz-amant e veze bombezat kêrioù Breizh gant ar Saozon-Amerikaned. Ur goñchenn e oa moarvat istor an diankachoù listri-spluj a oa barniet dindan ar c'hoc'hu, plasenn el Lisoù. Ar wirionez e oa n'edod o diogal e nab lac'h. Strowet e oa bet ar bombezennoù hep pal resis ebet dezho. Darn a oa kouezhet war vered an hantenoù.

E ser se e ouezis e oa bet gloezet R.G. endev ar vered-se. En e droad e oa bet tizhet. N. a oa bet straed Estrez hag e lavaras din e oa bet drailhet e c'har ha tzoç'het kuit bizied zo eus e droad. Aon a oa na chomfe kamm. Bramañ edo en ospital. Kredif a raed avat e parajs buan.

M.H. a gontas e oant bet spontet war-lorc'h ar gentañ gwagannad. N'en em gavent tamm ebet e surentez en o c'hav. Ne oa ket start tamm ebet ha ne oa ode ebet da vont er-maez. Ma vije kouezhet ur vombezenn war an ti e vijent bet douaret az vev er c'hav-se ken buan all.

Goude koan ez is da gavout S. e-giz m'en doa goulennet diganin.....
 Ne ouiemp ket petra ober. Tamm a oa c'hoazh an amzer daoust ma oa izel an heol. Mont a rejomp da azezañ war ur skaoñ, dirak ar Feldkommandatur, plasenn Hoch. E-pad ur pennad e komzomp eus ar vombezadeg. Neuze e stagas S. da studiadenniñ diwar-benn marc'hed ha karantez.....
 War-dro nav eur e tistrois d'ar gêr. Fellout a rae da G. ez afen betek Sant-Jermen, kenkas e vefe ezhomm da zispontañ hor mamm. Marteze e oa oc'h ober biloù. E gwir he doa bet son rak damc'houde e erruas va breur war varc'h-houarn eus Sant-Jermen da welout petra oa c'hoarvezet ganeomp. E Sant-Jermen e konted e oa bet distrujet an hant ar eus kêr, ha traoù all c'hoazh.

C'hoant en doa Y. da vont da weladenniñ ar reuzvaoù. E embroug a ris. Serrnoziñ a rae. Tizhout a rejomp dizale porzh-houarn Viarm. Ur bern tud a oa bodet atav dirak ar straed Naonedat, o sellout ouzh an distrededion. Polised a oa eveljust hogen alaman ebet. Poultrann e-leizh a oa bepred. Nervek e oa an dud a oa o labourer dindan an heol abaoe c'hwec'h eurvezh bennak rak d'ar c'houlz m'edomp eno e savas ur c'hadabuilh stre ur c'hrennard hag un den en oad. Hemañ a ginnigas skeif gant ar paotr. Dispartiet e voent gant ar balised. Kzi e oa savet en engroez ouzh o gwelout.

Palloc'h ez ejomp strezek ar Mailh, tostik d'al lac'h ma edon azezet e-kichen ar Saozon a oa neuze o tastum o zraoù da zistreiñ da Vro-Saoz d'ar

17 a viz Mezheven 1940. Ur vombezenn a oa kouezhet eno; ur wezenn a oa bet diskaret hag hi dizeliet gant ar c'hwezhadenn; goloet e oa an douar tro-dro gant ur pallenn gwer. Palloc'h e oa kouezhet ur vombezenn dres war roudennoù an tram: sevel a raent er vann evel buzhug troc'het o kendere'hel d'en em weañ. Malloù paveziou a oa bet bannet tro-dro. Palloc'h c'hoazh e oa bet dizeliet gwezennoù all, dibrenestret tiez, draetet ur c'harrdi gant ur vombezenn. En ur straed treuz e kejomp gant Alamaned a oa o sellout ouzh an distruj graet gant ur vombezenn en ur guzulikat kenetrezo.

Da ll eur nemet pemp-warn-ugent e oamp distro ar gêr.

ooooo

Notenn. Ar c'homite ez eus anv anezhañ e deroù ar pajennadoù-mañ a zo ar c'h'Comité Consultatif de Bretagne".(Y.O.)

YOUENN GWERNIG

U N D E V E Z H V A K E N E W - Y O R K

Ur skleur teneroc'h eget neon ar straed en em sile etre laouennoù ar stalafioù meneziat. Moarvat am boa ankouezet sevel e bouez d'an eurier milliget-se adarre, hag e oan chomet d'ober va laouenn un tammig re bell. Ul lamm a ris, ha dao d'ar prenestr, da c'houzout penaos oa kont gant aer kentañ an deiz.

Digoumoul kaer e oa an oabl hag e kinnigis gant didu va dremm d'un aezennig fresk ha yac'hus. Sioul iskiz oa pep tra. En tu all d'ar Grand Concourse, horolaj al Loew's Paradise, lore'husañ fiñvskeudenndi ar Bronx, a verke c'hwec'h eur hanter. Dihunet mat oan bremañ hag e ouien perak n'e doa ket sonet kloc'hig va eurier : sadorn e oa.

Splann ha kaer dreist e save an deiz a-us d'ar gêr ras. Sadorn e oa, hag an deiz-mañ oa din ! Hiziv avat e vo livet ganin mogerioù ar gêr, ar sal-gibellan ha, marteze, kambr ar vugale... Gwelloc'h e vefe, evelato, kregiñ gant ar "Moizez". Va mignon Saul B... en doa lakaet en e soñj kinnig ur "Moizez" d'e wreg Miriam evit he deiz-ar-bloaz. Kinniget am boa dezho un neubad tresadennoù eus an den meur da vezañ kizellet en izelvos gant ar "vodenn entanet" ha Taolennoù al Lezenn. Dibabet e voe unan anezho, nemet e kave da Viriam ne oa ket Yuzev

youenn gwernig

a-walc'h ar paotr kozh. Neuz-dremm ur soner skosa oa gantañ, moarvat, pe hini ur gourener kernevat. Na, reizhañ a ris stumm e fri ha traoùigoù all, hag e voe kavet dereat a-walc'h.

Dre ma n'am boa nemet va amzer vak evit e gizellañ, e oa poent bras kregiñ gant al labour. Ret oa din da gentañ mont da bourchas an tamm koat rekis. Stal va marc'hadour koat a zo en Svet Straed, tre-kichen Washington Square. Boas e vez arzourien Greenwich Village da ziskouez o "marc'hadourezh" div wech ar bloaz, e mezeven hag e miz gwengolo, war riblennoù-straed ar rannêr-se. Ur blijadur eo evit an daoulagad, ma ne seller ket re bizh a-wechoù evelato ! Da vat e oa bremañ ar baotred barvek gant o diskouezadeg gwengolo; un dra vat e vefe degas ar vugale ganin, dedennet ken-kenañ e vezont gant ar seurt traoù, hag un tammig peoc'h en defe o mamm, kuita, evit ur pennadig.

Bannoù kentañ an heol en em sile dibistig etre an daou di bras war-du Valentine Avenue hag a lakae bleunioù diwezhañ va liorzhi (dek troadad ha pemp, eeun hag eeun) da vouse'h-oarzhin. Reiñ a ris dezho ur banne dour fresk da evañ evit o lakaat eurusoc'h c'hoazh. En un tu bennak en em ganne ur strob-ad filiped, en ur chintal. Krog e oa an dud da ziblouzañ tro-war-dro. Yuzev kozh an trede a laoskas e vazailhadenn viraouac'hus evel kustum : ah, ah, aaah... ar genaoueg anezhañ. Un dro all bennak emichañs e c'hoarvezo gantañ taol spontus va contr Yann, Doue d'e bardono, a vanas gant e genou digor hag e rankas mont evel-se betek ar vourc'h da gaout ar mezeg evit distokañ e javedoù.

Mouezh skiltr Italianez ar c'hwec'hvet a ziframme sioulded boull ar beure gant tarzhe he rannyezh Napoli. Pell oamp betek kas gouzout perak e ranke d'ar Jan Bleo-mañ huchal kement-all, kent e c'hoarvezas deomp dizoleiñ e oa bouzar kloc'h he Vittorio kaezh. Klang! Klang! Digiglang! Edo daou morian dres dindan hor prenestroù, o tistlabezañ ar riblenn-straed eus boestoù goull ha loustoni all dirak stal an Ao. Pintchik, marc'hadour livioù ha paper-moger, hag o c'hargañ en un tump-orell heñvel ouzh ur c'harr-arzav, eus Fiorello Private Sanitation Service, Inc., ur c'haer a anv avat evit ar seurt micher.

N'en doa ket padet pell ar peoc'h, siwazh ! Adalek bremañ betek hanternoz da vihanañ e reno an trouz hag an tousmac'h ! Uhel en oabl glas e plave ur skrev ken diseblant ha tra ouzh mizerioù mibien Adam o tiskrapañ dindanañ evel c'hwiled. Mont a rae a daolioù askell gorrek, neuer lezirek e bannoù an heol

yaouank, davet gwazhenn-vor an Enez Hir, davet "Paumanok*... you fish-shaped island...", davet tonnoù meur an Atlantel. Fidandoustik, un tammig c'hoazh e c'hortozo Moizez kozh, re gaer an deiz roet deomp hiziv gant Yahweh en E vadelezh !

Kousket e oa pep hini e kambr ar vugale, moarvat e doa disonjet ne oa ket skol hiziv. Sevel a ris ar stalafioù en ur huchal : "Na, un deiz kaer evit mont d'an aod !..."

Ne oan ket peurzegouezhet er gegin ma veze klevet galcupadeg an treidigoù diarc'hen war al leur-di, c'hourzhadeg, ha dour o tiriilhañ puilh er sal-gibellañ.

- 'm eus aon int bet gwall brim gant o fedennoù hiziv, a laras va gwreg en ur lakaat ar baeron vras war an tan.

Hep dale e tiredas an div re vras d'ar gegin, naet, eurus, hag o c'halon digor : edo ar vidoù o fritañ goustedik er baeron vras.

- Ha chomet eo ho c'hoar vihan da neual er gibell ?

- Pi ! Hi ! Hi ! e voe respontet din.

Mont a ris neuze d'ober ur sell betek ar kambr. En he gwele oa al lamponez met dihun mat e oa.

- Arsa, pichonig, war da glud out bepred ?

- N'hell ket unan kousket en e beoc'h memes...., a c'hrozmolos an hini vihan.

Hounnezh he deus un teod, me 'lavar deoc'h. Met ur respont a zeuas, prim, diouz ar gegin.

- Ur vro zieub eo houmañ : kousk an neb a gar, ni 'zo 'vont d'an aod !

- Okay, a respontas ar Mari vihan, trec'het.

Horolaj al Doew's Paradise a verke seizh eur.

+
+ +

Un eur a vantjomp hejet-dihejet en tren dindandour, ar "Subway", hep nemeur a dra da wellout estroget dremennoù tud a bep gouenn, a bep liv, o vont hag o tont etre an diskennoù.

*Paumanok : "neuziet heñvel ur pesk". Anv indianek evit Long Island; hervez Walt Whitman, da vihanañ.

Goude an "Euclid Avenue Station" (mar plij), e tiboukas an tren e sklerijenn an deiz, hag e redas war al linenn uhel a-us da renkadou dizehan tiez karrézek Brooklyn, warno deleziou pellwell fonnus ha stank evel gwez ur c'hoad dizeil, ec'hon.

Gwelet e veze ur bern lien astennet da sec'hiñ a di da di, o stlakañ en avel evel bannieloù liesliv. Dre amañ, sur mat, e rank trec'hiñ c'hwez an tomatez hag ar c'hignen war pep c'hwez all da vare kean, mesk-ha-mesk gant safar ar rann-yezhoù Sikilia, Lombardia, Piemonte ha me oar. Souezhus eo penaos e vez santet raktal, hag alies "c'hvesaet", ranngerioù e lec'h ma vev tud ar c'hreisteiz. Gwelloc'h marteze lavar al "latined", europad pe amerikad, dezho kroc'henn gwenn, damzu pe zu.

Evit "tud a liv" ar Stadoù Unanet avat, n'eo ket ar memes kont. Ar paotr du amañ a zo amerikan koulz ha n'eus forzh pe Bingham, Smith, Mac Leod, Dupont pe O Sullivan all gwenn e groc'hen, koulz en e demz-spered, kaer vo lavar, hag en e zoare bevañ. Pa vez paour ha rediet da vevañ en ur ghetto evel Harlem ha lec'hioù all, e vez "santet" ivez siwazh, dre m'eo lous spontus e rannger. Met amañ, evel e pep kêr vras all moarvat, ne vez ket c'hwez vat gant ar baourentez. Ar paotr gwenn o vevañ en e rannger gwenn ha... paour ne vez ket kalz gwelloc'h e stad. E gwirionez, dek ha tri-ugent dre gant eus ar re baour er Stadoù Unanet emañ gwenn o c'hroc'hen; en abeg da se, marteze, ne vez ket savet gwall drouz war o zro.

Met edo hon trefñ o vont da dreuziñ lenn-vor Jamaica. War hon tu kleiz e welomp savadurioù Porzh-nij Etrevroadel Kennedy gant renkadou a girri-nij meur o c'hortoz o zro da vont d'an nec'h. Edo unan dres o paouez dizouarañ, dont a rae buan-buan davedomp. Fresk e vefemp mar teufe ar pezh tra ramzel-mañ d'en em frigasañ war an trefñ. An teir flac'h a selle ivez, esmaet, endra ma strake a-us d'hor penn kurun ar pevar rotor.

- Tadig, a c'houlennas Mari vihan, ha koezhañ 'ra ar c'hirri-nij war an trenioù a-wechoù ?

Gwenola an hini oa a gavas ar respont.

- Sur a-walc'h e vez roet un ael-mirer da bep karr-nij...

- Ha da bep trefñ ivez, emichañs, a eilgerias Annaig.

- Lakaet a-stroll gant hini pep beajour se a ra un armead vat a aeled evit hon diwall, ha n'eo ket al labour a vank dezho dre-amañ, va bugale gaezh.

Diouzh an daou du bremañ en em lede dour lor ar vorlenn. Gwelet e veze bagadoù houidi o neuiñ goustadik, ken diseblant ha tra ouzh tarzhadeg ar bigi tredan bleniet gant kêriz o genou leizh a c'hoarzh oc'h ankouaat labourioù tenn ar sizhun en ur c'hoari morner war ur mor dizañjer. Deut e oa an evned d'en em voazañ ouzh an trouz moarvat dre ma ne veze ket dibluet o reer dezho gant plom berv da heul an tarzhoù !

Er pellder en em lede ar "Rockaways", pal hor beaj : ur beg-douar heñvel a-walc'h ouzh hini Kiberen gant ur penzek kilometrad hiroc'h hag un tamm mat ledanoc'h, heñ karreg na roc'hell. Da grediñ eo int bet bruzunet evit reiñ lec'h d'ar bigi-pourmen ha d'an tiez. Ha tiez a zo amañ ken stank hag e n'eus forzh pe rannger all eus New-York : tiez-hañv koantik a-walc'h, tiez prenn o koezhañ en o foull, tiez a ugent solieradur nevez-flamm, tiez kenwerzh, ostaliri, hag all, ken na vefe ket tu da bikañ ur renkennadig pour zoken. Koulskoude n'eus ket keit-all zo e oa golc'et ar beg-douar-mañ gant koadoù meur ha parkeier strujus, kent m'oa bet gwerzhet d'an alouber Saoz gant ar "vretoned" blueñnek ruz o dremmoù. Da vihanañ ar "vretoned"-se a c'helle gwerzhañ tachennoù eus o douar d'an estrenien ha kaout an tu memestra da zerc'hel o broadelezh. Met gwir eo, ne oant met gouezidi. Ne vez ket goulennet digant an dud seven gwerzhañ o douar, tud evel hor Breizhiz o zogoù seiz ha hir o dremmoù, da skouer : en em unaniñ a reont ("a youl-vat" eveljust) gant ur Vammvro veur bennak a vez lonket ganti dizale o douar, o broadelezh hag... o zogoù seiz. Na chom ken ganto met o dremmoù hir.

Un dra zo ervat ha n'eo ket c'hoazh deut an dud a-benn da vilaat er bed-mañ, un dra a welomp bremañ a-us da banelloù ramzel o vrudañ n'ouzon dare pe Drink Cola an diaoul, un dra gwerc'h estlammus en e c'hlasded hag en e c'hlanded divuzul : ar mor bras, an Atlantel ec'hon, hiziv c'hoazh "o leñvañ di-baouez evit e dud kollet" koulz hag en amzerioù kent.

Nemeur a dud en em gave d'an ampoent war an draezhenn. Ul lezenn acour a ren dre amañ e-keñver monet d'an aod : goude gouel al Labour, a vez lidet da lun kentañ a viz Gwengolo, n'eo ken sañset da zen mont da grazañ e groc'hen war an traezh, ha gwelloc'h-se evit pennoù kalet eveldomp a gav koulz kerzhout war gregilh ha bezin eget war feskennoù, pavioù, boestigoù skingomz, silzig Frankfurt ha me oar me. Ar re a zeu d'an aod er mare-mañ ar bloaz a zo karourien wirion ar mor, n'int ket

stank anezho ha peurvuiañ int tud dereat.

Freskik e oa an dour, par da hini aodoù Bro-Leon e miz Eost : un dudi evit kroc'henn ur Breizhad ! Ha mouget oa pep trouz all gant tarzh an tonnoù war an traezh.

Ret mat oa bet sevel ur c'hastell, dezhañ mogerioù kreñv a-walc'h evit dere'hel ouzh al lanv, hervez huñvre kozh pep bugel, ha war an tour bras e voe sanket diouzh ret ur bannielig Breizh aozet diwar ur follenn baper gwenn, liv du va fluenn-blom hag un tamm keuneud. Dont a reas un denig kozh d'arvestiñ oberenn va zeir c'homer. Sammy oa e anv, hervezañ. Toger e oa bet e Manhattan e-pad daou ugent bloaz, war e leve oa eñ bremañ.

- Ur brav a gastell oc'h eus savet aze, merc'hedigoù, a laras Sammy.

- Trugarez, a respontas Annaig.

Ha neuze din-me, en ur ober ur skrabig d'e benn moal :

- Domaj eo n'ho poa ket liv ruz ha glas evit aozañ ar banniel, hemañ a seblant bout e kañv.

+
+ +

Da vare ar gourlenn, ha savetaet dres d'ar c'houlz ar bannielig diouzh dismantr ar c'hastell, e oa poent bras distreiñ d'ar gêr.

Nebeud a dra da gontañ diwar-benn an distro : ur veaj er "Subway" a zo goular ken d'ar vone, ken d'an donea. N'eo mat an treiñ-se nemet evit lenn ha ... sevel barzhonegoù, d'an neb hilliget gant ar seurt froudenn da vihanañ.

Dibabet o doa va zeir merc'hodenn ar c'houket en taol-mañ, ha m'am bije graet evelto e vefemp c'hoazh o vonedone e bouzelloù ar York Nevez !

Stad bras e voe graet gant keusteuenn ar vamm ha goude koan ne glaskas den ebet gouzout pet lampon oa da vezañ diskaret gant Sheriff ar pellwell.

Un huñvre sabatuus am boe en nozvezh-se :

Edo Moizez, ur Voizez ramzel, lakaet gantañ ur re votoù koad, o kerzhout war zour ur vorlenn. Kizellet e oa pep botez en neuz un houad. Gwisket e oa e-giz e vez taolennet e levrioù

Istor Sakr, nemet ur bragoù bras oa gantañ d'an ampoent. Ha pa sellis ouzh e zremm ez anavezis, gant sebez, dremm an toger Sammy, nemet ha kuzhet e oa e benn moal gant un tog pluenn hervez doare an Indianed.

Gourdrouzus e oa e zremm, avat, hag e huche : "Kañv, kañv, kañv !..." en ur hejañ gant e zorn dehou un dra a gredis da gantañ e oa un "tomahawk", ha ne oa, e gwirionez, met un tammig keuneud staet outañ ur follennig baper gant bandennoù gwenn ha du.

Sanket e oan e dour al lenn betek va groñch, ha kaer am boa ober, n'hellen ket distag va zreiz diouzh ar strad.

Bigi diniver a heulie Moizez-Sammy, enno bugaligoù o kanañ.

o o o

GOUUVEN PENNAOD

UR SAPRE FOELTR A EMSAVER

Devezh un "emsaver" ? Ne welan ster ebet en aters-mañ. Petra a ra eus un devezh bennak, devezh un "emsaver" ? Pe gentoc'h, petore diforc'h a c'hell bezañ etre devezh un "emsaver" ha devezh un nann-emsaver", eleze, e Breizh, un "diemsaver" ?

Dihuniñ a ran, sevel, em walc'hif, debrif, labourat, debrif, labourat, debrif ha kousket, ha me "umsaver", sañset, evel nep piv bennak ha n'em eus ket un doare "emsavel" a-ziforc'h da zihuniñ, em walc'hif...

Mar gallan meizañ ster ar gerioù brezhonek, ur gwered eo emsavel, ha neuze un emsaver a zo unan bennak em sav, reizh ? Met leverel a reer : "em sevel ouzh" udb. pe ub., hag an ouzh-se a ro ur ster d'an anv-kedarn.

Pe ouzh tra, pe ouzh tud, em sav an "emsaver" breizhat ? Ni ansa ! Ouzh Bro-C'hall, ouzh ar C'hallaoued. Met neuze, Bro-C'hall eo, ar C'hallaoued eo a ro ur ster da Vreizh ha d'an den breizhat ? Paneve a Vro-C'hall nag a C'hallaoued, ne ve ket a Vreizh nag a Vreizhad. Setu ur silogezh ampart, neketa, bavet Aristoteles !

Ha setu perak ne blij ket din an anv a "emsaver"; ur ger nac'hañ eo, daoust d'e lun, ha ken diglok hag ar ger "stourmer", am eus arveret betek an heug, padal.

Met, kemeromp ar ger evel m'emañ. Mard eus un "emsaver" ac'hanon, "em savan" bemdeiz, bep eur, bep pred ha bepred ouzh Bro-C'hall hag ar C'hallaoued. Ne ran ket avat. Prenañ a ra va fakad sigaretannoù er stal nesañ, a-unan gant Combat, pe, horresco ! ar Figaro a-wezhioù, hag e lavaran "trugarez" da blac'h ar stal - evit dezhi bout divalav ha sec'h-kras hag haugus, ha Gallez - gant "cals amour ha courtoisy". Mont a ran da c'houde gant an tren, enket va fri etre divronn spouronus ur pikol intron c'hall a c'hwezh flærius war va fri ha'm blev, pe e vousc'hoarzhan d'an degenn a-stok ouzhin - e ! piv oar ? - gwarezet gant kenwallerezh an hallfistoulegezh ha zo ar c'hentañ lezenn veur e trenioù ar vannlev; lavarout e ran "digarez" d'an ervbloueiou astut am eus e trenioù dre zegouezh, hag i Gallacoued; ha daoust din chom hep bezañ ur stoket outo eget ar re all (gaouidi ar re a ra Pich-dîr ac'hanon, siwazh!), turbabar muoc'h eget ar re all (gaouidi ar re a ra Pich-dîr ac'hanon, siwazh!), ne glaskan ket gouzout broadelezh ar plac'h m'emañ an endurdon ganti...

Ma, an holl baotred zo heñvel, keta, avel ma lavar va hanterdiegezh ha meur a hanterdiegezh all ken gwarizius ha hi, moarvat. Un "emsaver" ez eus ac'hanon e-pad an devezh emic'hañs ? Ya sur, mard eo bezañ un emsaver breizhat mont da selaou end-ezaou daou pe dri c'helanner gall er Sorbonne (Ha c'hoazh, ne gomzan ket eus an amzar-hont ma veze em c'herc'hen gwiskad unvan Luoz ar C'hallaoued !).

Hag echu eo an devezh, ha pa lavaran d'am gwreg e ven a-du evit gwelout "espered an Aotrou he gelañ", evel ma lavar an dud devot ha seven, n'on ket evit kompren gwelloc'h penaos a c'heller ober un "emsaver" ac'hanon. Pebezh paotr gudulus, ar Pennad-mañ, emezevo "tud an emsav"; n'eo ket sirius. N'on ket, tamm ebet, ha frealzus eo, me gav din, rak emañ ho sapre emsav o krevif diwar an enoe; an holl "De-profundis-ed"-se a fell dezho ma ve sellet oute evel harozed tragek, renerion gelaouennoù, bofbarbed, furerion folklor ha pennoù termaji, a gav dezho int bet dibabet gant an Doue, an Neñv, an Hanez pe Tisavour Meur an Hollved, evit diskouez ar "Sklerijenn" d'o febl, ned int ket par zoken d'ar c'hamalad Gbenye a oar da nebeutañ penaos ober gant dilerc'hioù-pred ar golonidegezh !

Mar ben un "emsaver", em sevel a rafen dizehan ouzh an aerouant. Ne ran ket. N'eus ket un emsaver ac'hanon. Setu.

Met marteze a-walc'h, ne zeu ket "emsaver" eus ar verb, hogen eus an anv kadarn "emsav" ? Dal ! Kavet em eus. Un emsaver zo ur paotr "dimeus an emsav" ! Saveteet on. Rak ne zo eus an emsav abaoe va skedusañ bugeliezh.

Ne oa ket dek vloaz ma pegen dija balafennoù "si la guerre éclate, nous déclarons la Bretagne neutre !". Met brezel zo bet. Ha neptu e vos Breizh, pe, mechal, lakaet e-barzh ? Pebezh emsav, tudañ ! Holl a-unan em savet ouzh

ar Voched evit brasañ gloar hor mammegvro vuiañ-geret ! Ha c'hoazh, bez' e oa tud kalonek d'an ampoent, hag ur strollad breizhat dellezek eus an anv-mañ ha neket ur vobinegezh foerellek !

Petra eo an "emsav" neuze ? Pa anv reiñ d'ar meskaj euzhus ma kaver ennañ tud o deus gouestlet o buhez d'o bro e-kichen paotred ar-sevenadur-hepken-hep-an-distarañ-politikerzh (breizhoc, eveljust ! Ne lavaran ket : ur politikerezh gall, rak, an holl en goar, ni a vag ur fidelod dizestrukipl evit ar vomegvro !), dafserion, biniaouerion, debreerion loar, beleion, frafmasoned, drouized, hag eveljust, o chom war-neuñv evel kaoc'hadoù e-barzh ur mall kaoc'hva, bagad gludek an hekañ tousegi; ur rezad holen, ur pifasad pebr, un elfennadig pebr-Spagn, ur c'helomad emroustet hag ur varikennad lnoekoni ha trubarderezh, meskit, heñvel er voutailh ha likit skornet war an daol : Mahlzeit ! Da skrin ho kalon ! Ha setu penaos e vezo saveteet Breizh !

*

Ha padal, padal, ober a ran un emsaver ac'hanon. Tra sebezhus ebet ne ran a-had an devezhioù. Bevañ a ran evel pep hini, gwelloc'h eget re zo, rak va labour eo al labour am eus dibabet ober; gwashoc'h eget re all peogwir ez on paour hag a tispignan va c'hoazh peadra a lavrioù kalvezel a laka va mignonad da skrijañ dirak o anv peurliesañ.

Petra am eus graet hiziv, da skouer ?

Ar beure-mañ n'on ket aet da Paris (gant un -s, aotrou Klerg ker, peogwir ne welan digarez ebet evit brezhonekaat anvioù-lec'hioù ar vro-se kentoc'h eget re Rusia pe Vrazil). Chomet on er gêr o stensilañ kalacouennig Kêr-Vreiz. Ha gouzout a rit pegen arabadus eo stensilañ ur skrid ? C'hwi hoc'h eus eñ lennet da gentañ, eñ skrivet c'hwi hoc'h-unan marteze, ha n'hoc'h eus tra ebet da zeñkiñ ken digantañ. Ha salv ma ve skriverezet ! Pe da nebeutañ domskrivet sklaer ! Siwazh, bez ez eus tud ken fall-put ha dilennadus o skritur ha va hini, ha n'eo ket gwir, â Rig&kos, va c'heneil ker ?

Met petra c'hoarvezo da c'houde ? Va c'heneiled eus Kêr-Vreiz o deus graet eus o seizh gwellañ evit ma vezo gouest ar gelaouennig da blijout d'ar vuiañ a dud : ur pennad-stur eun-tre, sklaer ha kentelius gant Lucien Chaler a c'hello bezañ lennet gant an holl; ur pennad ken eun-all gant Rafael Dreañ, hon tañs-orier, o c'houlenn digant hor c'hanvroiz - pebezh hegredeizh ! - digerif ur tamnig o yalc'h (ha troet eo e galleg ouzhpenn "afin que nul n'en ignore"); ur pennad gant Erwan Gwegen : a ! emañ e c'hortozan gant mall hochadennoù fuloret an doktorad souezhet ha mantrèt, o vezzhout n'int ket gouest ken da kompren kement tra skrivet e lañgaj beniget o c'havall. Nag ur vezh ! Skrivañ ur pennad skiantel - gouezoniell zoken, mar gallan o amediañ muoc'h c'hoazh gant arver (o !) an nevezc'her-mañ - war erin ar stered e-lec'h komz eus barzhoni hor c'hloc'hedioù

dantelezet pe veulfa seven an diwezhañ sotoni rennyezhel ! Ha neozh, n'eo ket diaesoc'h da gompren eget forzh pennad a lennont e galleg e "Sciences et Vie", met "kredif a ran start ez eo dihentañ ar re yaouank ez eo lokaat pe lezel menozioù evel-se an o fenn" a skrivo Klerg din ur wezh ouzhpenn. A ! mar skriv-ferwan Gwegen brezhoneg ken flour ha saourus hag an Ao. Bourdelles ("an depe-uteed a vot ar budjedoù" da skouer !)... Ha padal, kredet em eus spazhañ e pennad Erwan Gwegen an hanterenn eus ar gerioù kalvezol en doa krouet, hag i frammet keer e-wezhioù; evit echuiñ gant ar C'hannadig : "Divizoù brezhonek-gallek" Troude ha Milin evit ar vrezhonegerion nevez : lavaret a vezo ez eo skrivet e gwalarneg chimik, e soazhoneg zink pe e prederieg hudchimik, mechal !

An holl emsaverion a gavo tra pe draig da rebach ouzhip amañ pe ahont (ha petra ran-me, mar n'eo ket kas lizhiri bismigus da Huon, Russon, Klerg... war-lerc'h bezañ degemeret o c'helaouennoù, ar blouenn hag an traust, paotr !). Pe laz ? Dezhe da ober gwelloc'h, met e Breizh evel e lec'h all ar bismigerion ned int ket ar skriverion nag ar baourion ! (Nag ar beorion kennebaut, rak ar re zibourvesañ eo a re ar muiañ, amañ evel ahont, siwazh !). Marteze a vezo lavaret ur gerig hegarat gant an Ao. Hemon : n'eus den sevenoc'h egetañ hag aon em eus rak e savendad : pouezet ha fur eo e varamadennoù, anet, met c'hoant am be e welout o tiskar penn-da-benn an dro bennak ur skrid brezhonek - ha pa ve unan eus va re : - nemet evit ar blijadur da adkavout pluenn flemmus rener yaouank Gwalarn....

*

Met, dros, amañ o paouez degemer ul lizher digant O. M. ha dav da baotr Dulenn, ha flap war hemañ ha flip war henhont... A ! setu va lod, ha n'eus ket damantet din, m'en lar deoc'h ! Pezh zo plijus gant O. M. eo ingaldad e flemmoù, gwenn o bed ar re a gav gras dirak e zremm. Eo. "Parcere subiectis et debellare superbo". Biskoazh ne glavia digantañ an disterañ dismeg e-kefver ar re gouezhet, tra ma vez entrugar ouzh ar re a zalc'h ur gelloud bennak; nael eo en hini kozh, keta, petra bennak a soñjer diwar e benn. Ha forzh penaos, n'eus tra didalvoud er pezh a skriv - a gelenn kentoc'h, rak doareoù ur pregethwr a vez gantañ a-wezhioù - ha zoken pa'z a re bell gant a vavr, homañ a vez dizozet sonn. Ret a vezo din atebifi outañ. Peur ? N'on ket evit kas da benn kement am eus bouc'het. Gortoz a ray ur pennadig, betek ma vezin mezhek eus va diseblanted e-kefver an harluad o tisec'hiñ en silpenvan en abeg d'e vro, hor bro, en abeg d'hon diglonegezh, ha n'en deus ket ar gwir zoken da zisplegañ e vennozioù en Avinir dimeus ar Quessteg pa ne ve e-barzh renn al "libr-zopinioù" evel ur peanv bennak dizoloet Breizn gantañ dec'h da noz ! Met hiziv n'on ket evit skrivañ dezhañ peogwir em eus roet va ger da Lozic Vanae'h e va dereo ar pennad-mañ evit disadorn a zeu.

Ha traoù estr am eus da ober eget displegañ va buhez evel ar Mauriac

pe mont war-raok gant "danavell va brezeladennoù" e-giz ur c'holonial kozh war e leve ! Setu nay on gant ar yezhoniezh, anet, ha dav din labourat kalet mar fell din dont a-benn da vestroniañ un deiz he hentennoù. Ne livirin ket e ran al labour-se evit Breizh, rak ur gaoz ruz e ve. Pa grogis, e oa, evit gwir. Met tapet on bet gant an derzhienn, hag evit va flijadur hag evit habaskaat va c'hoant (er ster krenngembraek !) en gran bremañ. A-wezhioù e talvez evit ar brezhoneg ha Klerg a ray, ur wezh c'hoazh, ur "gouiziegi" ac'hann, tra ma ouzon re vat pegen skort eo va "gouiziegezh" ha n'eus nemet ur studier dister ac'hann. Gwir eo e tle lavarout an dra-mañ cum grano salis e vourvement (Met pitioul e ran dalc'hmat gant anv an Ao. Klerg hiziv evit e atahinañ ? Setu an emsav c'hoazh : ret deoc'h kavout abeg bepred er re zo an tostaf ouzhoc'h hag a garit ar gwellañ. Penaos e prezegenne Kalgakos gwezhall, dija ? A, setu : Nestriz illi dissensionibus ac discordiis clari uitia hostium in gloriam exercitus sui uertunt !). Forzh penaos, plijet din pe get e vezo ret din paouez bremañ gant ar skrid mañ, rak ret eo din darbariñ ar gentel a rin e Kêr-Vreizh disadorn a zeu.

Echu. Disadorn e c'hellin ober va mestrig ha diskouez d'ar selaouerion a youl vat penaos ez a ar safskriteg kamtchaka d'al lituaneg komtchoko ha d'ar gresianeg kimtchiki, an holl o tont diwar un indezeuropeg *k^m-p^ht- (da skrin ho kalon !). Da bep hini e albac'henn : anavout a ran ur paotr, da skouer, a wel GaoLoaie ha GaoLoaie e pep lec'h, met n'eo ket dirankontr evit kaloc-se. Me a fell din gouzout eus pelloc'h e tau ar furr-mañ pe an dibenn-ger-hont, hag e kev din e c'hell hevelap enklaskoù sklerijennañ ster don hor yezh a vremañ. Marteze e fazian, ha sorc'hannoù n'eo ken hervez ali an Ao. Hemon; met n'on ket evit e gredif, setu va gwanted. Studiañ a raimp a-gevret Buhez Sant Gwenole. Petore frouezh a zeuy ac'han ? Ne ouzon ket, netra ha gwashoc'h eget netra marteze, met marteze ivez e vezin helavar a-walc'h evit kendrec'hiñ va selaouerion ez eus kalz muioù eget na greder en hor skridoù kozh, ha ne c'heller ket bezañ ur Breizhad gwirion hep anavout hon engoun lennegel ha kaerder espar hor gwerzaouerezh krennvrezhonek. Siwazh n'on ket ken ampart ha ma plijfe din. Gwelloc'h e vije bet din marteze bukañ izeloc'h ha kenteliañ evit an eil dorez kentoc'h eget klask krouiñ elfennoù ur Skol-Veur vrezhonek. Aesoc'h e vije bet, met ret eo mont war-raok ha ne c'hellomp ket gortoz dek vloaz hor Skol-Veur. Mui-ouzh-mui e klevan ennon e vezo ret da Vreizh kavout tud c'hourdon war ar gouezoniezhoù, e savo o labourioù skiantel an hor yezh. Maveu Mordiern a zigores un hent d'eo e "ledañ-deskamant". Tamm-ha-tamm e voe gouezet evel-henn an istor, ar yezhoù, ar vevoniezh, an douaroniezh hag an douarouriezh, ha bremañ ar fizik hag ar gimiezh. Met an holl draoù-se ned eont ket pelloc'h eget a c'haller kavout en donlevrioù-skol gallek, alamanek pe saoznek. Ha padal ez eus gouiziegiou wirion e Breizh. Hunvreal a ran an deiz ma savfe Hemon ha fleurist displegadennoù o "Trois poèmes en moyen-breton" ha "Dictionnaire des Gloses" e brezhoneg evel Ifor Williams re e g"Canu Aneirin" o kembraeg, ma ve gwalet Gwilcher o touar-

oniezhaf ha Kervella o touarouriezhaf ha Jestin o sumeragoniezhaf e brezhoneg hag e brezhoneg hepken, ha n'eo ket evit al "lennar deboner" met evit o c'hen-
vraudeur, evit sevel ur cuezoniezh vrezhon ha brezhonek e-lec'h labourat evit
brasañ gloar ar "Science française"... Hunvreoù... Fiv oar ? Abanna en deus
savet e C'hexiadur a gorfadurezh hag Even e Istor ar yezhoù keltiek... Neuze ?
Ne vezo ket kavet un arboelloniour evit sevel labourioù kalvezel war e zisk-
iblezh ? Graet goap am eus ouzh an Ao. Bourdelles tuchantik, met ur mailh eo
war ar vicher-se, war e hafval. Ha derc'hel a ray e skiant evitaf ?

Ha diaesoc'h e ve evit gwir d'un ijinour brezhon sevel e labourioù kalv-
ezel e brezhoneg p'emañ e labourat e Breizh en ur greanti breizhek ? Evit an
ampoent, ya, peogwir e ra dicuer dezhañ ar gerioù ret da ezteuler e elfennekañ
ezhommoù, ha ne vezo gouest d'o anavout nemet pa vezo bet desket gant ur Skol-
Veur vrezhonek. Ne gav ket din e vezo breizhek ur Vreizh ma vezo rediet enni
an ijinourion ha'r pennoù-greanti da ober gant ar galleg evit ezhommoù o micher...

Setu ma randonan evel a c'hoarvez din mui-ouzh-mui... Dont a ran war an
oad, petra fell deoc'h, ha skuizh on henozh, goude un hevelep devezhiad "emeavel"
Noz vat, paotred, träumen Sie süß, Emsavgenossen !

o o o o o

BRENDAN J.L.

U N D E V E Z H N ' E U S F O R Z H P E H I N I

"Kile ker,

Bennozh Doue evit da lizher... gwelet em eus K...
skrivet em eus da ... Spi am eus...

... A wir galon ganit."

Kroget eo va devezh : ul lizher am eus bet digant A., hag ez
eilgerian raktal : setu me ouzh va zaol.

"Kile da,

Bennozh Doue evit ho lizher... gwelet em eus P...
Respont ebet digant O... Spi am eus...

... A wir galon ganeoc'h."

Echu eo va lizher : kas a rin anezhañ dre ar post hiziv.
Lizhiri all am eus da skrivañ : ne da ket buan gant ar skriv-
erez. Kroget em eus da zeskiñ nevez 'zo : B.E.N.N.O.Z.H.
D.O.U.E., hag all.

J. L. brendan

Va burev, sellout a ran ouzh va burev : ar vourdel eo, evel boas. Ur geriadur Brezhoneg-gallez (evit gwelout hag-ef e vez skrivet "harlu", pe "arlu"), paperioù e-leizh, ul ludueg, levrioù a brederouriezh : "La Structure du Comportement", mar plij ganeoc'h. Ar bajenn a viran gant "Taolenn ar c'hemmadurioù" (Skridoù Breizh 1946). "Aspect du Mythe" : aze e viran ar bajenn gant ur follenn vruderezh evit PREDER. Levrioù all a zo : "La Pensée sauvage", am eus pronet dec'h. Hegel, Husserl. A ! Sed ul levr brezhonek : "Ur Breizad oc'h adkavout Breiz". Kroget em eus d'e lenn : dedennus kenañ eo, pennadoù zo a vefe mat o adembann.

Ur voest segalennoù, profet din gant ur c'hile o paouez distreiñ eus Amsterdam.

Va c'hlerinetezenn, war ar siminal, ha div flettt. Ha va skriverez. Adkregiñ a ran.

"... va gwellañ soñjoù... "hag all, hag all..."

Setu penaos e krog va devezh, pe, kentoc'h, penaos e c'hell kregiñ. Sevel a ran. Lakaat a ran ur bladenn da droefi. Kanaouennoù "Western" eo ez int, hag ar benveg a zibun "Six packs to go" ha "Mule train". Hiziv ne dan da labourat nemet da zek eur hag em eus amzer evit respont arak mont kuit d'al lizhiri bet kaset din. (Perak ne respont ket va c'henskrivion ken buan ha me ?)

Taolenn 2 : setu me er straed, o vont d'ar Metro (va digarezit evit bezañ chomet hep lavarout deoc'h ez on un harluad - arluad o chom e Paris).

E-barzh ar Metro emañ bremañ. Kalz a dud a zo. Lenn a ran levr D. Katz, "Bredoniezh an Neuz". Ar re o deus savet ar bredoniezh-se ne cant ket prederourion. Traoù 'zo n'int ket gwall sklaer. Ne lavaront ket ez-resis ha "roet" e vez deomp an neuz, pe "dibabet", savet ganeomp. Da skouer, an neuzioù daoudalvoud, pa vez sellet outo un eil wezh, ne vezont anavezet nemet gant ma vez roet an hevelep talvoudegezh dezho. Pezh a hañval diskouez ez eus ur "roidigezh" en hor gweladur. Hogen, hervez Koffka, emañ an neuzioù en natur arak ma vefe tud evit sellout oute. Luziet eo. Dav e vo din imboure'hini war ar gudenn abalamour d'an displegaded a zo ret din ober a-benn un nebeut devezhioù.

Hag an anadennoiezh : un displegaded all am bo d'ober war an danvez-se; epokê eidetek ha tout. Ne m'eus ket lennet

"IDBEN..." na Michotte, daoust d'ar pezh a soñj tud 'zo. Gant ar vezh, memestra.

Sellout a ran en-dro din : tud o vont d'o labour, evel-don. Me a gav fentus prederiñ e brezhoneg, pa gredfe an holl e soñjan e gallez : ur gall evel ar re all.

Ur gudenn eo se : daoust hag-ef ez on evel ma vez sellet ouzhin ? Daoust hag-ef e c'hellan bout disheñvel diouzh ar pezh a hañvalan bezañ, rak, anavezet mat eo n'eus ket a ziforc'h etre an "diabarzh" hag an "diavaez". Ar re all a ra Gall ac'h-anon, hag e lavaran ez on me Breizhat. Me zo daou. N'eus nemet an Dieubidigezh hag a ziskoulmo ar gudenn. O c'hortoz : Dr Je-kyll and Mr Hyde : gall a-wezhioù, breizhat ar sadorn, diouzh an noz, e Kêr-Vreiz.

O, evel reizh, ne guzhan ket va mennozioù : gouzout a ra an holl ez on "Breizh Atav"; gwashoc'h, ne c'hellan ket chom gant an dud un eurvezh hep ma vefe komzet eus Breizh.

Va gwellañ kile a fulor bep wezh ma veneg an Breizh. Soñj am eus koulskoude, bezañ lavaret dezhañ : "Moi aussi je sui Français." Ha diouzhtu goude : "Puisque tout homme a deux patries, la sienne et la France." Ha pa c'houlenn va ali diarbenn De Gaulle ez eilgerian : "En tant qu'étranger résidant en France, je ne me reconnais pas le droit de m'introduire dans les affaires intérieures de votre pays." Ne blij ket dezhañ.

Taolenn 3 : Kentel lennegezh.

"Mallarmé... Claudel...le symbolisme...relire les "Cinq grandes odes...hag all, hag all. (Pa soñjan ez eus unan a ra "lennegour" ac'hanon : ammerdus a-grenn, ya, al lennegezh.) Muic'h a varzhoniezh e kavan en ur bajennad skrivet gant ur prederour gwirion evel Heidegger :

"Die Sprache ist das Haus des Seins. In ihrer Behausung wohnt der Mensch..."

pe Merleau-Ponty :

"L'homme est dans le monde comme le coeur est dans l'homme." eget e-barzh :

"Le vierge le vivace et le bel aujourd'hui..."

pe : "Dans l'orient désert quel devint mon ennui."

Echu eo an trede taolenn.

Evet em eus va bannac'h kafe gant va mignoned. Gallaoued holl anezho. Rediet e vezan da gomz gallez daoust ma teu a-

Ya, sur.

wezhioù gerioù brezhoneg war c'horre : "Evel just... penaos ? ... gast..."

Va meno a oa gentañ chom da zebriñ er c'harter Mont-parnasse, hogen e kav din e vo furoc'h distreiñ d'ar gêr diouzhtu. Iizhiri am eus da skrivañ evit P. hag em eus c'hoant kregiñ fenozh gant studi "La Pensée Sauvage".

Ha setu me er gêr adarre. Sellout a ran ouzh va levraoueg : emañ ar brederouriezh oc'h he aloubiñ. Hag e soñjan en Emsav : ur burzhud e chom c'hoazh embannadur ul levr; hag ar re a vez embannet n'int ket holl gwall dalvoudus. Soñjal a ran ivez n'eus ket bet troet e brezhoneg, betek-heh, tamm linenn eus Platon - ne gomzan ket eus Hegel pe Husserl. Petra a rajen me ma ne ouijen ket galleg ? Komzet em eus bremaig eus an displegadeg a vo ret din ober hep dale war an anadennoniezh : e galleg em eus un dek bennak a levrioù war ar gudenn; e brezhoneg, netra.

"Mont d'ar bobl... Mont d'ar bobl," a glemmich tud zo. Ya, mont d'ar bobl ha lavarout petra dezhi, pa n'omp ket gouest da ziskouez pemont levr a ouiziegezh. (Raklavar "Bevoniezh" p.7, PREDER Niv.29-30).

Abegoù ez eus, evelkent, da c'hoanagiñ : S.A.D.E.D. hag un nebeut tud o labourat.

N'ouzon ket ha danevellet am eus un "devezh a emsaver". Hogen, "emsaver" ne dal ket "dispac'her", evit ar mare, d'an nebeutañ. Ha re yaouank e oan, forzh penaos, evit lakaat an dud da grediñ am eus me lakaet savadur Roazhon da darzhañ.

o o o

T A O L E N N

DEC'H HA WARC'HOAZH gant Vefa de Bellaing	P. 3
PETRA ZO 'NEVEZ E BREIZH ? gant Alan Heusseff	11
UN DEVEZHIAD EN HARLU gant Olier Mordrel	21
KEIT HA M'EMAN AR GALL.... gant Abanna	31
DEVEZH AN HINI KOZH gant Etwan Gwegen	35
DISADORN 29 A VIZ MAE 1943 gant Youenn Olier	43
UN DEVEZH VAK E NEW-YORK gant Youenn Gweznig	53
UR SAPRE FOELTR A EMSAVER gant Goulsen Pennaod	61
UN DEVEZH N'EUS FORZH PEHINI gant J.L. Brendan	67

o o o

o

